



A. A. Milne

# Winnie-ar-Pou

Tresadennoù gant  
Ernest H. Shepard



bet lakeet e brezoneg  
gant skipaill  
Emgleo Breiz

Emgleo Breiz  
Skolig al Louarn



Bet embannet gand skoazell **Skol Uhel ar Vro**

Bet embannet gand **Skolig al Louarn**, Plouvien, 29212  
Plabenneg.

Bet moulet gand **Mesidou**, 40, ru ar Republik, 29200  
Brest.

Bet diskleriet hervez lezenn: kenta trimiziad 1988.

Peb gwir miret striz evid ar skrid brezoneg.

N°. I.S.B.N.: 2-900828-51-1

## Dezi

Dorn ouz dorn e teuom  
Kristofer Robin ha me  
Da lakaad al leor-mañ war ho parlenn,  
Souezet oh?  
Kared a rit anezañ?  
Just eo ar pezh ho-poa c'hoant?  
Peogwir ez eo hoh-hini ...  
Peogwir e karom ahanoh.

## Raglavar

Ma c'hoarvez ganeoh beza lennet eul leor all diwar-benn Kristofer Robin, e tleit kaoud soñj e-noa gwechall eun alarh (pe an alarh e-noa Kristofer Robin, n'am-eus ket soñj pehini) hag e veze greet Pou anezañ gantañ. Pell 'zo e oa an dra-ze, ha pa on-oa lavaret kenavo, on-oa dalhet an ano ganeom, pa n'on-oa ket soñjet e-nije c'hoant an alarh da gaoud anezañ c'hoaz. Ma, pa lavaras Edward an Arz e plijfe dezañ kaoud eun ano bourruz dezañ e-unan-penn, e-noa lavaret Kristofer Robin dioustu, heb chom d'en em zoñjal, e oa-eñ Winnie-ar-Pou. Hag e oa. Neuze, p'am-eus diskleriet perag Pou, ar peurrest a ziskleriin bremañ.

N'hellit ket chom pell amzer e Londrez heb mond d'ar Zoo. Bez' ez eus tud hag a ya da vale dre ar zoo o kregi gand ar penn, a vez greet MONDTRE anezañ, hag a gerz ken buan ha ma hallont en eur dremen dirag pep kél beteg en em gaved dirag ar penn a vez greet MOND-KUIT anezañ, med ez a ar re ar muia aketuz war-eeun dirag al loen a garont ar muia, hag eno e chomont. Neuze, pa'z a Kristofer Robin d'ar zoo, ez a el leh m'ema Arzed an Norz Yén, hag e vouskomz eun dra bennag d'an trede gward war an tu kleiz, hag e vez disparlet an noriou, hag e kantroem dre henchou teñval hag e pignom gand skalierou sonn beteg ma tegouezom 'benn ar fin d'ar hél ispisial, ha digoret e vez, hag e trot er-mêz eun dra hell gand foulenn, hag en eur youhal laouen "O, Arz", e lamm Kristofer Robin en e zivreh. Winnie eo ano an arz-se, pezh a ziskouez mad ez eo eun ano mad evid an arzed, med pezh a zo fentuz eo n'om ket evid kaoud soñj hag-eñ e vez greet Winnie diouz Pou pe Pou diouz Winnie. Her gouezet on-oa gwechall, med ankounac'haet

on-eus...

Skrivet em-oa ken pell hag an dra-mañ pa zavas Porhellig e benn hag e lavaras gand e vouez skiltr, "Ha me?" "Va Forhellig karet," emezon, "al leor penn-da-benn a zo diwar da benn". "Neuze ez eo diwar-benn Pou," a wihas. Gweled a rit petra eo. Gwarizuz eo pa zoñj e-noa Pou eur Raglavar Meur evitañ e-unan-penn. Ar moumounig eo Pou, evel just, n'eus ket da naha, med Porhellig a deu e-barz evid kalz traou a vank da Bou; peogwir n'heller ket kas Pou d'ar skol heb ma vefe gouezet gand an oll dud, med Porhellig a zo ken bihan m'en em zil e-barz eur hodell, leh ma vez êz-kenañ santoud anezañ pa n'oh ket sur ha diou wech seiz a zo daouzeg pe ugent warn-ugent. Gwechou 'zo en em zil er-mêz hag e sell piz ouz ar pod-liou, hag evel-se ez eo deuet a-benn da dapoud muioh a zeskadurez eged Pou, med Pou ne ra forz. Reou 'zo a zo speredeg, ha re all n'int ket, emezañ, ha setu.

Ha bremañ e lavar an oll re all, "Ha ni?" Neuze marteze ar gwella tra d'ober a zo paouez da skriva Raglavariou ha derhel gand al leor.

A.A.M.

### Notenn:

Skrivet eo al leor evel ma komz ar vugale, alese ar bern frazennou o komañs gand "Neuze" pe "Ha", hag al lavarrennou staget gand "ha" e-leh lakaad pikou.

Faziou distagadur e-leiz a ra ar vugale ive, ha merket int bet aliez. Souezuz a-walh eo o doare-skriva ive.

Gwechou 'zo e oa c'hoariou-geriou er skrid saozneg, a zo bet diêz-tre da lakaad e brezoneg. Greet on-eus euz or zeiz gwella, med n'om ket deut a-benn bewech.

Ar skipaill troerien.

## Taolenn

**Pennad kenta:** En em gavoud a reom gand Winnie-ar-Pou ha gand eun tolpad gwenan, hag an istor a gomañs.....13

**Eil pennad:** Ennañ e ya Pou da weled tud en eul leh striz.....30

**Trede pennad:** Ennañ e ya Pou ha Porhellig da chaseal ha war-bouez nebeud e tapont eur minard.....40

**Pevare pennad:** Ennañ e koll Iañ eul lost hag e kav Pou unan.....48

**Pemved pennad:** Ennañ en em gav Porhellig gand eun ofilant.....58


**C'hwehved pennad:** Ennañ e-neus Iañ e zeiz-ha-bloaz hag e vez roet daou brof dezañ.....71

**Seizved pennad:** Ennañ e teu Kanga ha Babig Rou d'ar Hoad, ha Porhellig a ya da gibella.....86


**Eizved pennad:** Ennañ e sav Kristofer Robin eun Avoñtur Vraz beteg Penn-ahel an Hanternoz.....102

**Naved pennad:** Ennañ ez eo gronnet Porhellig penn-da-benn gand an dour.....118


**Degved pennad:** Ennañ e ro Kristofer Robin eun abadenn en enor Pou, hag a lavaran kenavo.....131



BET TRESET GANIN



HA SKOAZELL AN AOTROU SHEPARD



## Pennad kenta

**En em gavoud a reom gand  
Winnie-ar-Pou  
ha gand  
eun tolpad gwenan,  
hag an istor a gomañs.**

O tiskenn ar viñs ema Edward an Arz, boum, boum, boum, a-bennboell war-lerh Kristofer Robin. N'eus nemed an doare-ze, emezañ, da ziskenn ar viñs, med a-wechou e kav dezañ e vefe eun doare all marteze, ma hellfe paouez stokal, hag en em zoñjal a ra diwar-benn an dra-ze. Kredi a ra neuze, marteze, n'eus ket. N'eus forz penaoz, ema bremañ en traoñ, ha prest da ober anaoudegez ganeoh. Setu amañ Winnie-ar-Pou.

P'am-oa klevet e ano evid ar wech kenta, m'em-oa lavaret just evel m'emaoh o vond da lavared, "Med me a zoñje din e oa eur paotr bihan!"

"Me ivez," a lavaras Kristofer Robin.

"Neuze n'hellez ket ober Winnie anezañ?"

"N'hellan ket."

"Med te a lavare..."

"Winnie-zar--Pou an hini eo. N'ouzout ket petra a dalv ar zar-ze?"

"Eo, bremañ e ouzon," emezon prim-ha-prim; "ha spi am-eus e rez ivez, rag ne vo lavaret netra all dit."

Gwechou 'zo e plij da Winnie c'hoari eun tamm bihan pa zeu d'an traoñ, ha gwechou 'zo e plij dezañ azeza sioul dirag an tan ha selaou eur rimodell. Fenez...

"Ma vefe kontet eur rimodell?" a lavaras Kristofer Robin.

"Peseurt rimodell?", emezon.

"Gouest e vefes da gonta unan da Winnie-ar-Pou, dousig ha brao?"

"Moarvad e hellan", emezon. "Peseurt rimodellou a blij dezañ?"

"Ar re diwar e benn. Rag euz ar rumm arzed-se eo."

"O, gweled a ran."

"Gouest e vefes neuze, dousig-tre?"

"Ez an d'ober eun taol êsa," emezon.

Greet 'm-eus neuze.

\* \* \* \* \*



Eur wech e oa, eur wech ne oa ket hag eur wech e oa memestra, pell, pell a zo abaoe, war-dro digwener diweza e oa. Beva a ree Winnie-ar-Pou e-unan-penn en eur hoad, dindan an ano Sanders.

*(Petra a ziniñ "dindan an ano?" a houlennas Kristofer Robin.)*


*"Ze a dalvez e oa skrivet e ano a-uz d'an nor e linennou aour, hag e veve dindannañ."*

*Winnie-ar-Pou ne oa ket gwall-zur diouz an dra-ze", a lavaras Kristofer Robin.*

*"Bremañ ez on," a hrozmolas eur vouez.*

*Neuze e kendalhan gand ma haoz," emezon.)*

Eun devez, pa oa oh ober eun tammig tro, e oa deuet betek eur frankizenn e-kreiz ar hoad, hag e-kreiz ar plas-se e oa eur pezh gwezenn dero, hag euz bég ar wezenn e teue eur fraoñv euz ar re greñva.



Azeza a reas Winnie-ar-Pou e traoñ ar wezenn, lakaad a reas e benn etre e baoiou, hag en em lakaas da zoñjal.


Da genta toud e lavaras d'e benn e-unan: "Ar fraoñv-ze a ziniñ eun dra bennag. N'eus ket eur seurt fraoñv, eur fraoñv dibaouez, heb na dalvezfe ket eun dra bennag. Ma'z eus eur fraoñv evel-se, se zo pa'z eus unan bennag o fraoñval, ha ma'z eus eun trouz fraoñv seurt-se, din da

houzoud, ez eo pa'z eus eur wenanenn."

Neuze en em lakaas da zoñjal pell amzer c'hoaz, hag e lavaras: "Din da houzoud, pal nemetañ eur wenanenn a zo ober mël."



Ha neuze e savas, hag e lavaras: "Ha ne vez greet mël, nemed evid ma hellfen debri anezañ." Neuze e komañsas da bignad ouz ar wezenn.



Eñ  
a bignas  
hag  
eñ  
a bignas  
hag  
eñ  
a bignas,  
ha  
pa bigne  
e kane  
eur  
ganaouenn  
vihan  
dezañ  
e-unan.  
Evel-henn  
e oa:

Ha n'eo ket fentuz  
Nag e plij ar mël d'eun arz?  
Fraoñv! fraoñv! fraoñv!  
Biskoaz kemend-all!




Neuze e pignas eun tammig uhelloh... hag eun tammig uhelloh... hag eun tammig uhelloh c'hoaz. War ar memez tro e soñjas en eur ganaouenn all:

Fentusad tra ma vije an Arzed Gwenan,  
Sevel a rafent o neiz e traoñ ar gwéz,  
Hag evel-se (ma vije ar Gwenan Arzed),  
'Vije ket red pignad ouz ar gwéz.

Skuiz e oa erru eun tammig, setu en em lakaas da gana eur werz. Tost-tre e oa bremañ, ha pa oa just war ar brank-se...

*Strak!*



"O, sikour!" a huchas Pou, en eur goueza dég troatad izelloh war ar brank dindannañ.

"Ma n'am-ije ket...", emezañ en eur choukbenna lamm-dilamm ugent troatad izelloh war ar brank nesa.

"Gweled a rez ar pezh am-oa c'hoant d'ober," a lavaras, hag e reas pennbouell en eur goueza tregont troatad izelloh, "ar pezh am-oa c'hoant d'ober..."

"Evel just, tost-tre e oan.." ah anzavas, tra ma rampe prim a-dreuz ar c'hweh brank all dindannañ.

"Echu eo, war a gredan", emezañ, hag e lavaras kenavo d'ar brank diweza, en eur drei teir gwech warnañ e-unan, hag e kouezas en e êz e-barz eur vodenn-lann, "Toud se pa blij kement ar mél din. O, sikour!"




Rampa a reas er-mêz euz ar vodenn-lann, brousta a reas an drein euz e fri, hag e krogas da zoñjal adarre. Hag an hini a deuas soñj dezañ da genta e oa Kristofer Robin.

(*"Me an hini e oa?" a lavaras Kristofer Robin gand eur vouez abafet, o kredi a-boan hag-eñ e oa gwir:*

*"Te an hini e oa."*

*Ne lavaras Kristofer Robin mann ebed, med e zaoulagad a deuas da veza brasoh-brasa hag e zremm ruz-wennoh- ruz-wenna.)*

Neuze Winnie-ar-Pou a yeas da gavoud e vignon Kristofer Robin, a veve a-dreñv eun nor wér en eul leh all euz ar hoad.



"Demad, Kristofer Robin," emezañ.

"Demad, Winnie-zar--Pou", emezout.

"Daoust hag-eñ n'az-pefe ket eun dra bennag heñvel ouz eur balon?"

"Eur balon?"

"Ya, o soñjal evel-se e oan tra ma oan o tond: "'Daoust hag-eñ e-nefe eun dra bennag heñvel ouz eur balon?' Oh en em houlenn diwar-benn ze e oan just, en eur zoñjal diwar-benn balonou, hag o soñjal en afer-ze."

"Petra ar foeltr a ri gand eur balon?", emezout.  
Selled a reas Winnie-ar-Pou en-dro dezañ evid gweled  
ha ne oa dén ebed o selaou, lakaad a reas e bao war e  
henou, hag e lavaras gand eur vourkomz hir.

"Mél!"

"Med n'ez ket da dapoud mél gand eur balon!"

"Hag e rin!", a lavaras Pou.

Setu e c'hoarveze e oas bet an deiz a-raog o c'hoari e ti  
da vignon Porhellig, hag az-poa bet balonou e-pad an abadenn.  
Te az-poa bet eur pezh balon gwér, hag unan euz kerent  
Konikl e-noa bet eur pezh hini glaz, ha pa oa evid gwir  
re yaouank eñ evid chom e-pad toud an abadenn, e-noa  
lesket anezañ aze; neuze az-poa degaset d'ar gêr an hini  
gwér hag an hini glaz war eun dro.

"Pehini a blijfe dit?", az-peus goulennet digand Pou.

Lakaad a reas e benn etre e baoiou hag en em lakaas da  
zoñjal ha da zoñjal.



"Evel-se ema an traou," emezañ. "Pa'z ez da glask mél  
gand eur balon, ar henta eo da nompaz lezel ar gwenan da  
houzoud emaout o tond. Neuze, ma vefe eur balon gwér  
ganit, e hellfent soñjal n'ez out nemed eun lodenn euz ar  
wezenn, ha ne rafent ket van diouzit, ha m'az-pefe eur

balon glaz, e hellfent soñjal ez out eun tamm euz an oabl,  
ha ne rafent ket van diouzit, hag an dalh avad a zo: Pehini  
eo ar gwella?"

"Daoust ha ne remerkfent ket ahanout dindan ar  
balon?", az-poa goulennet.

"Marteze e rafent, ha marteze ne rafent ket," a lavaras  
Winnie-ar-Pou. "Ne haller james lavared gand ar gwe-  
nan." En em zoñjal a reas e-pad eur pennadig amzer hag e  
lavaras: "Esea a rin beza heñvel ouz eur goumoulenn vihan  
du."



"Neuze e vefe gwelloc'h dit kaoud eur balon glaz," eme-  
zout; hag evel-se e oa bet renket an traou.

Ha setu ho-taou eet gand ar balon glaz, ha te a deuas da  
fuzuill ganit, e kenkaz ma vefe ezomm anezi, ha Winnie-  
ar-Pou a yeas d'eur plas leun a fank a oa anavezet mad  
gantañ, hag a ruillas e-barz beteg ma oa du-pod penn-  
kil-ha-troad; neuze, pa oe c'hwezet ar balon ken teo ha ma  
oa posubl, ha pa oah ho-taou, te ha Pou o terhel mad ar  
fiselell, az-peus laosket anezi da vond a-daol-trumm, hag  
an Arz Pou en em gavas o fichal grasiuz en oabl, hag e  
chomas aze, ken uhel ha bég ar wezenn, war-dro ugent  
troatad diouti.

"Ouhou!" az-poa huchet.



"Ha n'eo ket brao?", e-noa huchet Winnie-ar-Pou dit-te. "Deuz petra e vefe lavaret ez on heñvel?"

"Te 'zo heñvel ouz eun arz o terhel eur balon," emezout.

"Ha n'on ket," a lavaras Pou, enkreuz ennañ, "... ha n'on ket heñvel ouz eur goumoulenn vihan du en eun oabl glaz?"

"Nann, n'eo ket kement-se evel-se."

"A, mad, marteze deuz amañ en uhel ez eo disheñvel? Hag evel pa lavaras bepred, n'haller jamez lavared tra gand ar gwenan."

Ne oa bannah avel ebed evid kas anezañ tostoh ouz ar wezenn, ha neuze e chomas eno. Bez' e helle gweled ar mél, c'hwéz ar mél a deue dezañ, med ne oa ket tamm ebed evid tizoud ar mél.

Goude eur pennadig amzer e halvas ahanout.

"Kristofer Robin!" emezañ en eur vouskomz hir.

"Petra 'zo?"

"Me 'gav din o-deus disfiz ar gwenan ouz eun dra bennag!"

"Peseurt tra?"

"N'ouzon ket. Med eun dra bennag a lavar din o-deus disfiz."

"Martez e soñj dezo out deut da laerez o mél?"

"Martez a-walh. N'haller ket gouzoud gand ar gwenan."



Eur pennadig peoh all a oa c'hoaz, ha neuze e halvas ahanout adarre.

"Kristofer Robin!"

"Petra 'zo?"

"N'eus ket eun disglavier ganit er gêr?"

"Geus, me zoñj din."

"Me garfe e tegasfes anezañ amañ, hag e valefez gantañ a-héd hag a-dreuz en eur zelled ouzin eur wech an amzer en eul lavared: 'Gast, seblant glao a zo'. D'am zoñj, ma rafes an dra-ze, e sikourfes ahanon da douella ar gwenan-mañ."

Ma, c'hoarzet az-poa ennout da-unan. "Paour-kêz Arz sod!" med n'az-poa ket lavaret an dra-ze a vouez uhel kement e karez anezañ, hag e oas eet d'ar gêr da gerhad da zisglavier

"O, erru oas!" a huchas Winnie-ar-Pou, a-benn ma oas distroet beteg ar wezenn. "Krog e oan d'ober gwad fall. Bremañ e welan mad ez eo disfiziuz a-grenn ar gwenan."

"Digeri a rin va disglavier?" az-poa goulennet.

"Ya, med gortoz eur pennadig. Red eo deom beza evel a zo dleet. Ar wenanenn genta da veza touellet eo ar Rouanez. Gouest out da weled pehini eo ar Rouanez diouz an traoñ aze?"

"N'on ket."

"Ma n'eo ket eun druez! Mad, bremañ, ma hallez mond ha dond gand da zisglavier, en eul lavared 'Gast, seblant glao a zo', e rin va zeiz posubl evid kana eur ganaouenn vihan 'Kanaouenn Goumoulenn', unan a hellfe marteze beza kanet gand eur goumoulenn... Kerz!"

Setu pa oas o vond hag o tond en eur en em houlen hag-eñ e rafe glao, e kane war eun dro Winnie-ar-Pou ar ganaouenn-mañ:

Pegen brao eo beza eur goumoulenn  
O nijal en oabl glaz!  
Pep koumoulenn vihan  
A gan atao a-bouez-penn.

"Pegen brao eo beza eur gougoulenn  
O nijal en oabl glaz"  
Pebez lorh beza evel-se  
Beza eur gougoulenn vihan.



Ar gwenan a oa o safroni ken disfiziuz ha biskoaz. Reou 'zo, memestra, a guitaas o neiz, ha da nijal en-dro d'ar gougoulenn pa edo o kregi gand eil poz ar ganaouenn-mañ. Eur wenenann a azezas war fri ar gougoulenn e-pad eur pennadig, ha neuze e yeas kuit adarre.

"Kristofer – aiou! Robin!", a huchas ar gougoulenn.

"Petra 'zo?"

"Edon just o soñjal, hag em-eus greet va zoñj diwar-benn eun dra a-bouez kenañ. Ar gwenan-mañ eo re ar rummad fall."

"Gwir eo?"

"Fall-pud int. Neuze D'am zoñj, e rafent mél euz ar falla, n'eo ket?"

"Ha gwir eo ze?"

"Ya. Neuze e karfen gwelloh diskenn."

"Penaoz?", az-poa goulennet.

N'e-noa ket soñjet Winnie-ar-Pou diwar-benn ze. Ma laoskfe ar fiselell, e kouezfe — boum — ha ne blije ket ar menoz-se dezañ. Neuze e prederias e-pad pell, ha neuze e lavaras:

"Kristofer Robin, red eo dit tenna war ar balon gand da fuzuill. Ganit ema da fuzuill?"

"Evel just ema ganin," emezout. "Med ma ran an dra-ze, e vo draillet ar balon," emezout.

"Med ma ne rez ket," a lavaras Pou, "e vo red din leuskel ar fiselell, ha me an hini eo a vo draillet."

Pa oe lavaret an dra-ze gantañ az-poa komprenet, buket az-peus ouz ar balon gand kalz a evez, ha tennet az-peus.

"Aiou!" a lavaras Pou.

"C'hwitet 'm-eus?" az-poa goulennet?


"N'eo ket dres az-pefe c'hwitet," a lavaras Pou, "med c'hwitet 'peus ar balon."

"Va digarez," emezout, ha dao! adarre. Ar wech-se az-poa touchet ar balon, hag eet eo an êr dioutañ goustadig, ha Winnie-ar-Pou da ziskenn dousig-dousig beteg an dou-ar.

Med ken stegn e oa e zivreh goude beza dalhet fiselell ar balon ken pell, ma oant chomet stegn en êr a-uz d'e benn eur zizunvez pe ouspenn, ha bewech ma teue eur gelienenn war e fri e c'hweze warni. Ha me 'gav din — med n'on ket sur — ez eo en abeg d'an dra-ze e oa bet greet Pou anezañ.



"Echu eo ar rimodell?" a houlennas Kristofer Robin.  
"Diwez an hini genta an hini eo. Re all a zo."  
"Diwar va fenn hag hini Pou?"  
"Ha Porhellig ha Konikl hag an oll re ahanoh. 'Peus ket soñj?"  
"Geo, soñj am-eus, med pa êsean derhel soñj, eh an-kounac'haan."  
"An deiz-se ma klaskas Pou ha Porhellig tapoud an Ofilant..."  
"N'o-deus ket tapet anezañ, geo?"  
"Nann."  
"Pou ne oa ket evid ober, pa n'e-neus tamm skiant ebed. Tapet 'm-oa anezañ?"  
"Se a vo gwelet e-barz ar rimodell."  
Respont a reas "ya" Kristofer Robin en eur heja e benn.  
"Soñj mad am-eus," emezañ, "med Pou ne oar ket mad-tre, setu perag e plij dezañ e vefe kontet ar rimodell adarre. Peogwir ez eo neuze eur wir rimodell, ha nompaz eun dra da veza kounnaet nemetken."




"Setu penaoz e komprenan an traou," emezon.  
Huanadi a reas Kristofer Robin e-pad pell, dastum a reas e Arz dre e harr, hag ez eas kuit war-zu an nor, en eur stleja Pou a-dreñv dezañ. E-tal an nor, en em droas hag e lavaras: "Dond a ri da weled ahanon oh en em walhi e-barz va hibell?"  
"Marteze," emezon.  
"M-oa ket gloazet anezañ p'am-oa tennet warnañ, n'eo ket?"  
"Tamm ebed".  
Heja a reas e benn hag ez eas kuit, hag eur pennadig goude em-oa klevet Winnie-ar-Pou — boum, boum, boum — o sevel an diri war e lerh.


## Eil pennad

### Ennañ e ya Pou da weled tud en eul leh striz

Edward an Arz, anavezet gand e vignoned evel Winnie-ar-Pou, pe Pou (berroh eo), a oa o vale eun deiz dre ar hoad, en eur zardonenni gand lorch evitañ e-unan. Greet e-noa eur zardonennig er beure-ze pa oa oh ober e Jimnastik Treutaad dirag ar melezour: *Tra-la-lan tra-la-la*, tra ma eh astenne e izili ken uhel ha ma halle, ha neuze, *tra-la-la, tra-la-la — o, sikour — la*, tra ma êsae steki ouz e vizied-



troad. Goude merenn-vihan, e-noa lavaret hag adlavaret ar homzou-ze dezañ e-unan beteg m'e-noa anavezet anezo dre eñvor, ha bremañ e sardonenne anezo penn-da-benn, mad-tre. Evel-se e oa:



*Tra-la-la, tra-la-la,  
tra-la-la, tra-la-la,  
Ram-tam-tidi-lam-tam  
Tidi-lidi, tidi-lidi  
Tidi-lidi, tidi-lidi  
Ram-tam-tam-lidi-tam*

Edo o sardonenni ar zardonenn-ze evitañ e-unan, en eur vale laouen, oh en em houlen petra e oa ar re all oh ober, ha penaoz e oa beza unan all, pa erruas a-daol-trumm e-kichenn eur hleuz trêz, hag e-barz ar hleuz e oa eun toull braz.

"Aha!" a lavaras Pou (*Ram-tam-tidi-lam-tam*). "Ma ana-vezan eun dra bennag diwar-benn eun dra bennag, e kas soñj an toull-ze din deuz Konikl," emezañ, "ha Konikl a gas soñj deuz Kouvidi!" emezañ, "ha Kouvidi a gas soñj deuz Boued ha Selaou-ahanon-o-sardonenni, hag e se. *Ram-tam-tam-tid-tam*."

Neuze e stouas, e lakaas e benn e-barz an toull, hag e huchas:

"N'eus dén ebed er gêr?"

Trumm e oe trouz eur vountadeg a deue deuz diabarz an toull, ha neuze peoh. "Ar pez am-eus lavaret eo: "N'eus dén ebed er gêr?" a huchas Pou kreñv-tre.

"Nann!" eme eur vouez; hag ouspenn, "N'az-peus ket ezomm huchal ken kreñv. Klevet em-oa ahanout mad-tre ar wech kenta."

"C'hwitell!" a lavaras Pou. "N'eus dén ebed amañ e gwirionez?"

"Dén ebed."

Tenna a reas Winnie-ar-Pou e benn er-mêz euz an toull, hag e soñjas eun tamm bihan, hag en em lavaras, "Sur ez eus unan bennag aze, rag unan bennag e-neus lavaret 'Dén ebed'". Neuze e lakaas a-nevez e benn e-barz an toull hag e lavaras.

"Salud, Konikl, te an hini eo, n'eo ket?"

"Nann", a lavaras Konikl, gand eun ton-mouez dis-heñvel ar wech-mañ.

"Med n'eo ket mouez Konikl an hini eo?"

"Ne gredan ket", a lavaras Konikl. "Da vihanna n'he-deus ket c'hoant da veza."

"O!" a lavaras Pou.

Tenna a reas e benn er-mêz euz an toull; eur zoñj all, e-noa; lakaad a reas anezañ e-barz adarre, hag e lavaras:

"Mad, galloud a rafes lavared din en eun doare hegarad pe leh ema Konikl?"

"Eet eo da weled e vignon Pou an Arz, a zo eur mignon braz dezañ."

"Med me an hini eo!", eme Arz, souezet-braz.


"Piou eo Me?"

"Pou an Arz"

"Sur out?" a lavaras Konikl, souezetoh c'hoaz.

"Sur penn-da-benn," a lavaras Pou.

"O, mad, neuze, deus tre."



Neuze Pou en em vountas, en em vountas, en em vountas e-barz ar riboul, hag a-benn ar fin, ez erruas e-barz an toull.

"Rezon az-peus penn-da-benn," a lavaras Konikl, en eur zelled piz outañ. "Te an hini eo. Laouen on da weled ahanout."

"Piou a zoñje dit-te e oa?"

"Ma! ne oan ket sur. Gouzoud a rez penaoz ema an traou e-barz ar Hoad. Ne heller ket lezel n'eus forz piou dond e-barz e di. Red eo beza war evez. Plijoud a rafe dit debri eur genaouad deuz eun dra bennag?"

Pou a blije dezañ bepred debri eun draig bennag da unneg eur deuz ar beure, hag e oa laouen-tre o weled Konikl o sortial an asiédou hag ar gobou; ha pa lava-



ras Konikl, "Mél pe lèz dizouret gand da damm bara?" e oa ken enervet ma lavaras: "An daou", ha neuze, evid na vefe ket soñjet pegen lonteg e oa, e lavaras ouspenn, "Med, n'en em jalez ket gand ar bara, mar plij." Hag e-pad pell goude-ze ne lavaras netra... beteg 'benn ar fin, en eur zardonenni outañ e-unan, gand eur vouez yodeg, e savas, e serras gand karantez pao Konikl, hag e lavaras e oa red dezañ mond kuit.


"Red eo dit?" a lavaras Konikl, seven.

"Ma!" a lavaras Pou, "bez' e hellfen chom eur pennadig c'hoaz, ma vefe — ma rofes —" hag e selle kement-ha-kement war-du armel ar boued.

"E gwirionez", a lavaras Konikl, "e oa em zoñj mond er-mêz dioustu."

"O! mad!, neuze, ez an kuit. Kenavo."

Ma! kenavo, ma'z oh sur n'az-peus ket c'hoant debri eun tamm c'hoaz."



"Bez'ez eus c'hoaz?", a houlennas Pou buan-ha-buan. Konikl a zistalias an daol hag a lavaras: "N'eus ket kén."

"Me zoñje mad ne oa ket kén," a lavaras Pou, en eur en em zoñjal en eur heja e benn. "Ma! Kenavo. Red eo din mond kuit."

Neuze e krogas da grapad er-mêz euz an toull. Sacha a ree gand e baoiou a-raog, hag e vounte gand e baoiou a-dreñv, hag eur pennadig goude e oa e fri er-mêz euz an toull... hag e ziouskouarn... hag e baoiou a-raog... hag e ziouskoaz... ha neuze...



"O! sikour!" a lavaras Pou. "Gwelloh e vefe din dond en-dro."

"O! c'hwitell!" a lavaras Pou. "Red eo din mond war-raog."

"N'on ket evid ober nag an eil nag egile!" a lavaras Pou. "O! sikour, ha c'hwitell!"

Med neuze e-noa c'hoant Konikl da vond er-mêz da bourmen ivez, ha pa oa stouvet toull an nor a-raog, ez eas er-mêz dre an nor a-dreñv. Ober a reas an dro, hag e teuas da weled Pou.

"Ma! peget out?" a houlennas outañ.

"N'on ket", a lavaras Pou evel-se. "Ne ran nemed dis-kuiza, hag en em zoñjal, ha fraoñval din-me va-unan."

"Neuze, ro din eur pao."

Astenn a reas Pou an Arz eur pao, ha Konikl da zacha, da zacha, da zacha...

"Aiou!" a huchas Pou. "Droug a rez din!"

"E gwirionez," a lavaras Konikl, "ez out peget."

"Evel-se ema," a lavaras Pou, imor ennañ, "pa n'eo ket

braz a-walh toull an doriou."

"Evel-se ema," a lavaras Konikl, rust, "pa zebrer re. E oan o soñjal", a lavaras Konikl, "med ne felle ket din lavared tra," a lavaras Konikl, "e tebre re unan ahanom," a lavaras Konikl, "hag e ouien ne oa ket me," a lavaras. "Mad! mad! mond a rin da gerhad Kristofer Robin."

Edo Kristofer Robin o chom e penn all ar hoad, ha pa deuas en-dro gand Konikl, o weled an hanter a-raog euz Pou, e lavaras, "Paour-kêz arz sod," gand eur vouez ken karantezuz ma teuas en-dro an esperañs gand an oll re.

"Krog e oan da zoñjal", eme Arz, en eur rufla eun tammig bihan, "ne vo ket kén Konikl evid implijoud e zor a-raog kén. Hag an dra-ze ne blij ket din", emezañ.

"Din-me kennebeud," a lavaras Konikl.

"Implij e zor a-raog adarre?" a lavaras Kristofer Robin. "Evel just e hello implijoud e zor a-raog adarre."

"Mad," a lavaras Konikl.

"Ma ne hellom ket sacha warnout, Pou, marteze e hellfem bounta warnout a-dreñv."

E vourennou a skrabas Konikl en eur en em zoñjal, hag e sachas an evez war ar féd pa vefe bountet Pou a-dreñv, e vefe e-barz evid mad, ha dén ebed ne oa laouennoh egetañ da weled Pou, med memestra, reou 'zo a vev e-barz ar gwéz ha reou 'zo a vev dindan an douar, ha:

"Te a zoñj dit n'hellin ket kén dond er-mêz?", a lavaras Pou.

"Me a fell din lavared," a lavaras Konikl, "pa'z out deut a-benn da vond kén pell beteg al leh-se, e vefe eun druez gwasta anezañ."

Aproui a reas Kristofer Robin gand e benn.

"Neuze n'eus nemed eun dra d'ober," a lavaras. "Red e vo dim-ni gortoz ma vi deut da veza treud en-dro."

"Pegeid amzer a vo red evid ma vin treud?" a houlennas Pou gand enkreuz.

"War-dro eur zizunvez, a gav din."

"Med n'on ket evid chom amañ e-pad eur zizunvez!"

"Te a hall chom amañ êz-tre, paour-kêz Arz sod. Sacha ahanout alese an hini eo a zo kén diêz d'ober."

"Lenn a raim leoriou dit-te," a lavaras Konikl laouen.

"Spi am-eus ne raio ket erh," a lavaras ouspenn. "Hag e lavarann, paour-kêz paotr, e kemerez plas a-walh e-barz ma zi — daoust-hag-eñ e hellan implijoud da baoiou a-dreñv evid lakaad ma zerviedennou a-istribill? Peogwir, a fell din lavared, emaint aze, — ha ne reont netra —, hag e vefe êz-tre evidon lakaad ar serviedennou a-istribill outo."

"Eur zizunvez!" a lavaras Pou, trist-tre. "Hag ar boued?"

"Tamm boued ebed 'm-eus aon," a lavaras Kristofer Robin, "evid dond a-benn da dreutaad buannoh. Med ni a lenno leoriou dit."


Kregi a reas Arz da hirvoudi, med e kavas dioustu ne oa ket evid ober pa oa peget kén stard; hag eun daerenn a ruillas euz e lagad, pa oa o lavared:

"Daoust-hag-eñ e hellfes lenn din eul Leor Harpa, unan a hallfe sikour ha frealzi eun Arz Yennet-Stard-Kenañ?"


Neuze, e-pad eur zizunvez, e lennas Kristofer Robin leoriou seurt-se deuz tu Hanternoz Pou,



ha Konikl



a lakaas e zillad a-istribill ouz tu ar  
Hreisteiz...  
hag etre an daou benn en em zante  
Arz o tond da veza treutoh-treuta.  
Hag e  
fin ar zizun e lavaras Kristofer  
Robin:  
"Bremañ!"  
Neuze, e tapas e-barz paoiou a-raog  
Pou  
ha Konikl a stardas e baoiou en-dro  
da zargreiz Kristofer Robin, hag oll  
mignoned ha kerent Konikl a stardas o  
faoiou en-dro da zargreiz an eil egile,  
hag an oll re anezo a zachas assemblez...  
E-pad pell ne lavaras Pou nemed  
"aiou!"  
Hag "O!"



Ha neuze, a-daol-trumm, e lavaras "paf!", just evel pa  
vefe bet eun taf o tond er-mêz euz gouzoug eur voutaill.

Ha Kristofer Robin ha Konikl hag oll mignoned ha  
kerent Konikl a gouezas a-dreuz-kil... ha warno e kouezas  
Winnie-ar-Pou — dieub!

Neuze, goude beza stouet e benn evid trugarekaad e  
vignoned, e talhas gand e bourmenadenn a-dreuz ar hoad,  
en eur fraoñval dezañ e-unan gand lorh. Med Kristofer  
Robin a zelle outañ gand karantez, en eur lavared outañ  
e-unan, "Paour-kêz Arz sod!"



## Pennad tri

### Ennañ e ya Pou ha Porhellig da chaseal ha war-bouez nebeud e tapont eur minard


Edo Porhellig o chom en eun ti braz-tre e-kreiz eur hoad fao, hag ar wezenn-fao a oa e-kreiz ar hoad, ha Porhellig a oa o chom e kreiz an ti. E-kichenn e di e oa eun tamm plankenn torret a oa merket warnañ: "DIVENNET E." Pa houlennas Kristofer Robin digantañ petra zinifie an dra-ze, e respontas e oa ano e dad-koz, a veze implijet e-barz e famill abaoe pell 'zo. Lavared a reas Kristofer Robin ne oa ket posubl beza anvet Divennet E., ha Porhellig a lavaras e oa posubl, pa oa ano e dad-koz, berr evid Divennet (mond-) E-barz, a oa distummet euz Divennet Edern. E dad-koz e-noa bet daou ano, e kenkaz e-nije kollet unan — Divennet, hervez ano eun eontr dezañ, hag Edern goude Divennet.

"Daou ano am-eus", a lavaras Kristofer Robin, dizeblant.

"Just memez mod eo," a lavaras Porhellig.

Eun devez brao e-pad ar goañv, pa oa Porhellig o kas kuit an erh a-zirag e di, e savas e benn dre zegouez, hag eno e oa Winnie-ar-Pou. Edo Pou o kerzed dibaouez war-gelh, en eur zoñjal en eun dra bennag all, ha pa halvas Porhellig anezañ, e talhas da gerzed heb ober van.

"Eho!" a lavaras Porhellig, "petra emhout oh ober?"



"O chaseal", a lavaras Pou.

"O chaseal petra?"

"War roudou unan bennag emeon," a lavaras Winnie-ar-Pou, misteriu.

"War roudou piou?", a lavaras Porhellig, en eur zond en e gichenn.

"Setu ar pezh en em houlennan va-unan. En em houlenn a ran, Piou?"

"Petra a responti, a gav dit?"

"Red e vo din gortoz beteg m'en em gavin gantañ," a lavaras Winnie-ar-Pou. "Bremañ sell amañ." Diskouez a ree eur plas war an douar. "Petra a welez aze?"



"Roudou," a lavaras Porhellig. "Roudou eur pao". Enervet, e teuas gantañ eur griadenn skiltr. "O, Pou! te a gréd dit ez eo eur - eur - eur minard?" (1)

"Marteze," a lavaras Pou. "A-wechou ez eo, a-wechou n'eo ket. N'eus ket moyenn da lavared gand roudou paoiou."

Goude an nebeud geriou-ze ez eas war-raog oh heulia ar roudou, ha Porhellig, goude beza sellet outañ e-pad eur vunutenn pe ziou, a redas war e lerh. Souden e chomas Winnie-ar-Pou a-zav, stouet e benn war ar roudou kemmesket kén-ha-kén.

"Petra 'zo?", a houlennas Porhellig.

"Souezuz-kenañ eo," a lavaras Arz, "war a zeblant ez eus daou loen bremañ. Ar roudenn-mañ — n'eus forz petra e oa — a zo en em gavet gand unan all — n'eus forz petra eo — hag an diou a ya war-raog asamblez. Daoust ha ne deufes ket ganin, Porhellig, e kenkaz e vefent Loened Enebour din?"

Skraba e skouarn a reas Porhellig en eun doare flour, hag e lavaras n'e-noa netra d'ober beteg digwener, hag e vefe plijet-tre da zond, gand ma vefe e gwirionez eur Minard.

"Te a lavarfe kentoh, ma vefe daou Vinard", a lavaras Winnie-ar-Pou, ha Porhellig a lavaras, forz penaoz, n'e-noa netra da ober beteg digwener. Neuze ez ejont pelloh o-daou asamblez.

Eur bochadig gwez-melez a oa just aze, hag e oa evel



ma vefe eet an daou Vinard, ma oa minarded anezo e gwirionez, a oa bet oh ober tro ar bochadig-se; neuze ez eas Pou ha Porhellig en-dro d'ar bochadig-se war o lerh; Porhellig o tremen e amzer o lavared da Bou petra e-noa greet e dad-koz Divennet E. da Gas-kuit Reuted goude Heulia-e-Roudou, ha penaoz e houzañvas e dad-koz Divennet E. e-pad e vloaveziou diweza dre Verrded Alan, ha traou all interesuz; ha Pou en em houlenne petra oa eun tad-koz, ha marteze ma oant war roudou Daou Dad-koz, daoust hag-eñ e vefe aotreet da gas unan anezo d'ar gêr ha da viroud

anezañ, ha petra a lavarfe Kristofer Robin. Ha bepred ez ee ar roudou war-raog dirazo... A-daol-trumm e chomas a-zav Winnie-ar-Pou, hag enervet e tiskouezas eur plas dirazañ. "Sell 'ta!"




"Petra?" a lavaras Porhellig, o lammad gand ar souez. Ha neuze, evid diskouez ne oa ket bet spontet, e lammas hag e tilammas eur wech pe ziuou ouspenn evel pa vefe oh ober jimnastik.

"Ar roudou!" a lavaras Pou. "Eun trede loen a zo en em gavet gand an daou all!" "Pou!" a huchas Porhellig. "Kavoud a ra dit ez eo eur Minard all?"

"N'eo ket," a lavaras Pou, "peogwir e ra roudennou disheñvel. Daou Vinard hag unan eo, evel ma hellfe beza, Manard, pe Daou, evel ma hellfe beza, Manarded hag unan, mar deo evel-se, Minard. Dalhom da vond war o lerh."

Neuze ez ejont war-raog, enkrezet tamm-pe-damm bremañ, e kenkaz e vefe Menoziou Droug gand an tri loen a oa dirazo. Ha Porhellig a hoantae stard e vefe bet aze e Dad-Koz D.E., e-leh beza forz peleh, ha Pou a zoñjas pegen brao e vefe ma en em gavfent gand Kristofer Robin a-daol-trumm, evel pa vefe dre zegouez, ha netra nemed pa gare kement Kristofer Robin. Ha neuze, a-daol-trumm, e chomas Winnie-ar-Pou a-zav adarre, hag e lipas bég e fri

evid yennaad anezañ, peogwir e oa tommoh ha muioh enkrezet eged biskoaz en e vuhez en a-raog. Pevar loen a oa dirazo!



"Gweled a rez, Porhellig? Sell ouz o roudou. Tri, evel ma oa, Minarded, hag unan, evel ma oa, Manard. Eur Minard all a zo en em gavet ganto!"


Hag evel-se e seblante beza. Aze e oa ar roudou; o tremen an eil re war ar re all amañ, mesk-ha-mesk an eil re gand ar re all aze; med, frêz kenañ a-wechou, e veze gwelet roudou pevar strollad a baoiou. "Me gav din," a lavaras Porhellig goude beza lipet bég e fri ivez, ha bet kavet ne gase ket an dra-ze kalz a beoh dezañ, "Me gav din am-eus soñj euz eun dra bennag. Emaon just o kaoud soñj am-oa dizoñjet ober eun dra bennag deh ha ne vin ket evid ober 'benn warhoaz. Neuze e kav din e rankan e gwirionez mond en-dro hag ober anezañ bremañ."

"Ober a raim anezañ goude kreisteiz, hag ez in ganit," a lavaras Pou.

"N'eo ket an doare tra a heller ober goude kreisteiz," a lavaras Porhellig buan. "Bez' ez eo eun dra ispisial evid ar beure, a zo da veza greet deuz ar beure, ha, ma vez posubl, etre an euriou — Péd eur eo, d'az soñj?"

"Tro-dro kreisteiz," a lavaras Winnie-ar-Pou, dre zelled ouz an heol. "Etre, evel ma oan o lavared, etre kreisteiz ha kreisteiz pemp. Neuze, e gwirionez, va faour-kêz Pou, digarez ahanon — Petra eo se?"

Selled a reas Pou ouz an oabl, ha neuze, pa gleve ar whitelladenn a-nevez, e sellas etre skourrou eun dervenn vraz, ha neuze e welas eur mignon dezañ.



"Kristofer Robin an hini eo," emezañ.

"Neuze e vez mad pep tra," a lavaras Porhellig. "Gantañ ne vo riskl ebed kén evidout. Kenavo," hag ez eas d'ar gêr d'an trot kén buan ha ma helle, evuruz-kenañ da veza Er-mêz Peb Dañjer adarre.

Diskenn a reas goustadig Kristofer Robin euz e wezenn.

"Paour-kêz Arz sod," emezañ, "petra e oas oh ober? Da genta e oas eet en-dro d'ar bochadig gwez diou wech da-unan-penn, ha neuze e-noa redet Porhellig war da lersh, hag e oah eet en-dro adarre asamblez, ha neuze e oah just o vond d'ober an dro eur pevare gwech ..."



"Gortoz eur pennad," a lavaras Winnie-ar-Pou, en eur zevel e bao.

Azeza a reas hag e prederias, hervez an doare prederiusa a halle prederia. Neuze e lakaas e bao en unan euz ar Roudou... ha neuze e skrapas e fri diou wech, hag e savas.

"Ya," a lavaras Winnie-ar-Pou.

"Kompren a ran bremañ," a lavaras Winnie-ar-Pou.

"Sod ha Touellet on bet," emezañ, "hag ez on eun Arz Heb Tamm Penn Ebed."

"Te a zo ar Gwella Arz er Béd A-béz," a lavaras Kristofer Robin, evid konforti anezañ.

"Gwir eo?" a lavaras Pou leun a spi. Ha neuze e sklerijennas e zremm a-daol-trumm.

"Forz penaoz," emezañ, koulz Lein eo tost-da-vad." Neuze ez eas d'ar gêr evid kaoud anezañ.

-----  
(1) Minard: eul loen n'eus ket anezañ, a vez lavaret emañ e baoiou dehou berroh eged e baoiou kleiz, ha neuze e rank kerzed bepred war eur bantenn, ha deuz ar memez tu bepred. "Kas unan bennag da chascal ar minard", a zo ober goap outañ.

## Pennad pevar

### Ennañ e koll Iañ eul lost hag e kav Pou unan

Edo an Azen Koz Griz Iañ e-unan-penn en eur horn euz ar hoad, leh ma oa kalz a askol, e dreid a-raog digoret mad, e benn deuz eun tu, hag o soñjal diwar-benn traou 'zo. Gwechou 'zo e soñje ennañ e-unan, tristig, "Perag?" hag gwechou all e soñje, "Evid petra?", ha gwechou 'zo e




soñje "Abalamour da betra?" — ha gwechou 'zo ne ouie tamm ebed diwar-benn petra e oa o soñjal. Neuze, pa deuas Winnie-ar-Pou en eur jilgammad, e oa Iañ eüruz-kenañ da halloud chom heb soñjal e-pad eur pennadig amzer, evid lavared dezañ "Penaos 'ma kont?" en eun doare trist-spontuz.

"Ha penaos ema kont ganit?" a lavaras Winnie-ar-Pou.

Heja a reas Iañ e benn euz an eil tu d'egile.

"Pas kement-se," emezañ. "Abaoe pell amzer ne zeblant ket din e vefen mad-tre."

"O! siwaz!," a lavaras Pou, "Nebet on gand se. Me 'zo 'vond da zelled ouzit e-pad eur pennad."



Chom a ree Iañ aze, en eur zelled tristig ouz an douar, ha Winnie-ar-Pou a gerzas eur wech en-dro dezañ.

"Med, petra a zo erruet gand da lost?" emezañ, souezet-braz.

"Petra a zo erruet gantañ?" eme Iañ.

"N'ema ket aze."

"Sur out?"

"Ma, pe ez eus eul lost aze pe n'eus ket. N'eus ket tu da fazia diwar e benn, ha da hini n'ema ket aze!"

"Neuze, petra a zo aze?"

"Mann ebed."

"Sellom," eme Iañ, hag ez eas war e giz goustadig beteg ar plas leh ma oa bet e lost eur pennadig 'zo, ha neuze, o kavoud ne oa ket evid tapoud anezañ, e troas




en-dro deuz an tu all, beteg ma teuas en-dro d'al leh ma oa da genta, ha neuze e stouas e benn hag e sellas etre e baoiou a-raog, hag a-benn ar fin e lavaras, en eur huanadi e-pad pell hag en eun doare tristig, "Me gav din ema ar gwir ganit."

"Evel just ema ar gwir ganin," a lavaras Pou.

"Dond a ra kalz a draou da veza sklêr," eme Iañ trist-spontuz. "Pep tra a deu da veza sklêr. N'eo ket souezuz."

"Evel just 'peus dizoñjet anezañ leh bennag," a lavaras Winnie-ar-Pou.

"Kemeret eo bet gand unan bennag, sur," eme Iañ. "Pebez haillon e tle beza," a lavaras ouspenn, goude beza chomet mud e-pad pell.



Santoud a reas Pou e tlefe lavared eun dra bennag evid sikour anezañ, med ne ouie ket just petra. Neuze, e plas lavared eun dra bennag, e lakaas en e zoñj ober eun dra bennag evid sikour anezañ.

"Iañ," emezañ war an ton braz, "Me, Winnie-ar-Pou, a gavo da lost evidout."

"Trugarez, Pou," a respontas Iañ. "Te a zo eur wir mignon," emezañ. "N'eo ket evel reou 'zo," emezañ.

Neuze, ez eas kuit Winnie-ar-Pou evid klask lost Iañ.

Loha a reas gand eur beurevez brao euz an Nevez-Amzer e-barz ar hoad. Koumoulennou bihan ha blod a hoarie gand plijadur e-barz eun oabl glaz, o lammad-dilammad eur wech an amzer dirag an heol, evel pa vefent deut evid laha anezañ, ha neuze o riskla kuit a-daol-trumm evid ma hellfe an hini a zeue war-lerh kaoud he zro. Drezo hag etrezo e skede an heol kaloneg; hag eur brouskoad, a oa bet gwisket a-héd ar bloaz gand gwez-pin, a oa evel pa vefe kosaet ha gwisket-fall e par an dantelez glaz nevez a oa deuet ken brao war ar gwez-fao. A-dreuz ar brouskoajou hag ar hoajou bihan e kerze Arz; mond a ree war ziribin a-dreuz lann ha brug, dreist goueledou gwaziou leun a rehier, pignad a ree gand kleuziou mein-krag evid mond e-barz ar brug a-nevez; ha neuze a-benn ar fin, skuiz hag aon gantañ, ez erruas d'ar Hoad Kant Devez-Arad. Kar e oa e-barz ar Hoad Kant Devez-Arad e veve Kaouenn.

"Ha ma oar unan bennag tra-pe-dra diwar-benn tra-pe-dra," a lavaras Arz dezañ e-unan, "ez eo Kaouenn a oar eun dra bennag diwar-benn eun dra bennag," emezañ, "pe va ano n'eo ket Winnie-ar-Pou," emezañ. "Ar pez eo," a lavaras ouspenn. "Setu ar pez ho-peus c'hoant gouzoud."

Beva a ree Kaouenn e-barz ar Histineg, eur henkiz koz, eun drugar anezañ, meurdezusoh eged hini n'eus forz piou bennag all, pe e seblante evel-se da Arz, pa oa eur morzol hag eur gordenn-gloh war eun dro. Dindan ar morzol e oa skrivet:

SNIT MA VEZ RED RESPNT, MAR PLIJ.

Dindan ar gordenn-gloh e oa skrivet:

SKOT MA NE VEZ KET RED RSPND, MAR PLIJ

Skrivet oa bet an daou dra-ze gand Kristofer Robin, a oa an hini nemetañ e-barz ar hoad a vefe gouest da zigeja; evid pezh a zell ouz Kaouenn, ken fur ha ma oa e meur a



dro, gouest da lenn ha da skriva e ano dezañ KOUENN, a-benn ma oa red lenn geriou diêz evel RUZELL ha BARAMANN, ez ee pep tra da get.

Lenn a reas Winnie-ar-Pou an daou skrid gand aket braz, da genta euz an tu kleiz d'an tu dehou, ha goude, e kenkaz e vefe en em dromplet, euz an tu dehou d'an tu kleiz. Neuze, evid beza sur-mat, e skoas gand ar morzol hag e sachas warnañ, e sachas war gordenn ar hloh hag e

skoas warni, hag e huchas a-bouez-penn kement ha ma helle, "Kaouenn! Red eo respont din! Ema Arz o komz ouzit." Digoret e oe an nor, hag e sellas Kaouenn er-mêz.

"Demad, Pou," emezañ. "Penaos ema an traou?"

"Spontuz ha trist," a lavaras Pou, "peowgir e-neus kollet Iañ e lost, hag eñ eur mignon din. Hag eo teñvalzah e benn en abeg da ze. Neuze, daoust ha ne hellfes ket lavared din penaos adkavoud anezañ?"

"Ma," a lavaras Kaouenn, "sed amañ penaos ema ar Prosezadur ordin e seurt degoueziou."

"Petra a dalv Plijadur Ordin?" a lavaras Pou. "Rag me a zo eun Arz Striz-tre e Benn, ha diêz on lakeet gand seurt geriou."

"Talvezoud a ra ar Pez a zo da veza Greet."

"Gand ma talvez an dra-ze, ne ran forz," a lavaras Pou, uvel.

Ar pez a zo d'ober a zo evel-henn. Da genta, Sevel eur skritell evid eur Rekoñpañs. Neuze ..."

"Gortoz eur vunutenn," a lavaras Pou, en eur zevel e bao. "Petra a dleom ober evid ober an dra-mañ — ar pez az-peus lavaret? Streviet 'peus just pa oas o vond da lavared din."

"M-eus ket streviet."

"Geo, greet 'peus, Kaouenn."

"Va digarez, Pou, n'am-eus ket greet. N'heller ket strevia heb gouzoud."

"Mad, n'heller ket gouzoud ma n'eus ket eun dra bennag a zo bet streviet."


"Ar pez a lavar a oa, 'Da genta, Rei eur rekoñpañs'."

"Emaoh oh ober anezañ adarre," a lavaras Pou, tristig.

"Eur Rekoñpañs!" a lavaras Kaouenn kreñv-tre. "Emaom o vond da skriva eur skritell evid lavared e vo roet eun dra vraz bennag d'an hini a gavo lost Iañ."

"Gweled a ran, Gweled a ran," a lavaras Pou, en eur aproui gand e benn. "Komz diwar-benn traou braz," a lavaras en eur huñvreal, "Me a zo boaz da zebri eun dra vihan bennag tro-dro bremañ — tro-dro an eur-mañ deuz ar beure," hag e sellas, c'hoant braz ennañ, ouz ar ganas-

tell e korn saloñs bihan Kaouenn; "just eur genaouad lêz dizouret pe petra c'hoaz, eun dra bennag gand eul lipadenn vél..."



"Mad, neuze," a lavaras Kaouenn, "skriva a reom ar skritell-mañ, hag e vo lakeet ganeom er Hoad a-béz."

"Eul lipadenn vél," a vouskomzas Arz evitañ e-unan, "pe — pe nompaz, evel ma hellfe beza." Huanadi a reas kement-ha-kement, hag e reas e zeiz posubl evid selaou ar pezh e oa Kaouenn o lavared.

Med Kaouenn a gomze dibaouez, oh ober gand geriou hirroh-hirra, beteg ma teuas en-dro 'benn ar fin d'al leh ma oa da genta toud, hag e tisplegas e oa Kristofer Robin an hini gwella evid skriva ar skritell-ze.

"Eñ an hini eo e-neus skrivet ar re a zo war va dor evidon-me. 'Peus ket gwelet anezo, Pou?"

Abaoe eur pennad amzer e lavare Pou "Ya" pe "Nann" tro-ha-tro, serr e zaoulagad, d'an oll draou e oa Kaouenn o lavared, ha p'e-noa lavaret "Ya, ya" ar wech diweza, e lavaras, "Nann, tamm ebed," bremañ, heb gouzoud e gwirionez diwar-benn petra edo Kaouenn o komz.

"'Peus ket gwelet anezo?" a lavaras Kaouenn, souezet eun tammig. "Deus da zelled outo bremañ."

Neuze ez ejont er-mêz. Hag e sellas Pou ouz ar morzol hag ouz ar pezh a oa merket didannañ, hag e sellas ouz kordenn ar hloh hag ouz ar pezh a oa merket dindanni, hag ar muia e selle ouz kordenn ar hloh, ar muia e kave dezañ

e-noa gwelet eun dra bennag evel-se dija, en eul leh bennag, eun nebeud amzer 'zo.

"Eur vraz a gordenn-gloh, n'eo ket?" a lavaras Kaouenn.

Aproui a reas Pou gand e benn.

"Kas a ra soñj din euz eun dra bennag," emezañ, "med n'hellan ket derhel soñj euz petra oa. Peleh 'peus bet anezi?"

"Me 'm-eus kavet anezi er Hoad dre zegouez. A-istribill edo ouz eur vodenn, hag e soñjis da genta e oa unan bennag o chom aze, neuze 'm-oa sachet warni evid lakaad ar hloh da zeni, med ne hoarvezas netra, ha neuze em-oa sonet adarre kreñv-kreñv, hag e oa chomet e-barz va dorn, ha pa ne hañvale dén ebed kaoud ezomm anezi, em-oa kaset anezi d'ar gêr, ha..."



"Kaouenn," a lavaras Pou, war eun ton rust, "greet 'peus eur fazi. Unan bennag e-noa ezomm anezi."

"Piou?"

"Iañ. Va mignon kér Iañ. Eñ a oa ... eñ a oa sod ganti."

"Sod ganti?"

"Evel pa vefe stag outi," a lavaras Winnie-ar-Pou, tristig.



\*\*\*\*\*



Neuze, en eur lavared ar geriou-ze, e tistagas anezi, hag e kasas anezi en-dro da Iañ; ha pa oa bet skoulmet gand Kristofer Robin en he leh mad adarre, e fringas Iañ a-dreuz ar Hoad, en eur lakaad e lost da ficha kén laouen kén en em zantas Winnie-ar-Pou eun tammig drol, hag e oa red dezañ mond buan d'ar gêr evid debri eun tamm bihan euz eun dra bennag evid terri e naon. Hag, en eur dorcha e he-nou eun hanter-eurvez goude-ze, e kanas gand lorch evitañ e-unan:



Piou e-neus kavet al lost?  
 "Me", a lavaras Pou,  
 Da ziv eur nemed kard  
 (E gwirionez ne oa nemed unneg eur nemed kard),  
 Me a gavas al lost!"



## Pennad pemp

### Ennañ en em gav Porhellig gand eun ofilant

Eun devez, pa oa Kristofer Robin ha Winnie-ar-Pou ha Porhellig o komz assemblez, eh echuas Kristofer Robin ar genaouad e oa o tebri, hag e lavaras heb soñjal: "Gwelet em-eus eun Ofilant hirio, Porhellig."

"Petra e oa oh ober?" a houlennas Porhellig.

"Nemed mond pounner war e bouez," a lavaras Kristofer Robin. "Ne gav ket din e-neus gwelet ahanon."

"Gwelet 'm-eus unan eur wech," a lavaras Porhellig.

"Da vihanna e kredan," emezañ. "Marteze ne oa ket unan."

"Me ivez," a lavaras Pou, oh en em houlenn petra oa eun Ofilant.

"Ne weler ket aliez anezo," a lavaras Kristofer Robin heb teurel evez.

"Pas bremañ."

"Pas d'ar mare-mañ euz ar bloavez," a lavaras Pou.

Neuze e komzjont diwar-benn eun dra all, beteg ma oa deut poent evid Pou ha Porhellig da vond assemblez d'ar gêr. Da genta, pa'z eent en eur jilgammad a-héd ar wenedenn a oa war vord ar Hoad Kant Devez-Arad, ne lavarent ket kalz a dra an eil d'egile; med pa'z errujont e-kichenn ar stêr, hag e oant en em skoazellet an eil egile evid tremen war mein ar roudour, hag e oa posubl dezo kerzed kichenn-ha-kichenn adarre war ar brug, en em lakajont da

gomz, evel daou vignon, diwar-benn an dra-mañ-dra, ha Porhellig a lavaras, "Ma kompenez mad ahanon, Pou," ha Pou a lavare, "Se 'zo just ar pez a zoñjen me va-unan, Porhellig," ha Porhellig a lavare, "Med, a-hend-all, Pou, e rankom derhel soñj," hag e responte Pou, "Gwir penn-da-benn, Porhellig, daoust m'am-oa dizoñjet anezañ evid an ampoent." Ha neuze, pa oant just oh en em gavoud gand ar C'hweh Gwezenn-Bin, e sellas Pou tro-war-dro evid gweled ha ne oa dén all ebed o selaou anezo, hag e lavaras war an ton braz:

"Porhellig, divizet 'm-eus eun dra bennag."

"Petra 'peus divizet, Pou?"

"Divizet 'm-eus tapoud eun Ofilant."

Pou a lavaras "ya" meur a wech gand e benn tra ma lavare an dra-ze, hag e hortoze ma vefe bet lavaret "Penaoz?" gand Porhellig, pe "Pou, n'helli ket!", pe eun dra bennag seurt-se evid sikour anezañ, med Porhellig ne lavaras netra. E gwirionez e-noa keuz n'e-noa ket soñjet-eñ en dra-ze da genta.



"Ober a rin anezañ," a lavaras Pou, goude beza gortozet eun tammig pelloh, "en eur implij eun trap. Red eo ma vo eun Trap leun a finesa, neuze e vo red dit skoazella ahanon, Porhellig."

"Pou, a lavaras Porhellig, oh en em zantoud laouenbraz adarre, "Ober a rin." Ha neuze e lavaras, "Penaoz e raim?", ha Pou a lavaras, "Gwir eo. Penaoz?" Hag o-daou da azeza asamblez evid prederia diwar-benn an afer-ze.

Menez kenta Pou a oa e vefe red dezo kleuza eur Foz Don-Tre, ha neuze e teufe an ofilant e-kichenn hag e kouezfe e-barz ar foz, ha...

"Perag?", a lavaras Porhellig.

"Perag petra?", a lavaras Pou.

"Perag e kouezfe e-barz?"

Skrabad a reas Pou e fri gand e bao, hag e lavaras e rankfe an Olifant mond dre ar hoard, en eur vouskana eur ganaouenn vihan, hag en eur zelled ouz an oabl, oh en em houlenn ha glao a rafe, hag evel-se ne welfe ket ar Foz Don-Tre a-raog ma vefe kouezet hanter e-barz... Pa vefe re ziwezd.

Porhellig a lavaras e oa eun Trap euz ar henta, med, ha ma rafe glao dija?

Skrabad a reas Pou e fri a-nevez, hag e lavaras n'e-noa ket soñjet en dra-ze. Ha neuze e oe laouen adarre, hag e lavaras ma rafe glao dija, e sellfe an Ofilant ouz an oabl en eur en em houlenn ha paouez a rafe ar glao, ha neuze ne welfe ket ar Foz Don-Tre a-raog ma vefe kouezet hanter e-barz... Pa vefe re ziwezd.

Lavared a reas Porhellig, bremañ ma oa bet diskleriet ar gudenn-ze, e soñje e oa eun Trap leun a finesa.

Fier-kenañ e oe Pou pa glevas an dra-ze, hag e kavas dezañ e oa tapet an Ofilant tost-da-vad, med e chome eun dra bennag all a oa da veza soñjet diwar e benn, hag e oa hennez. Peleh e kleuzfent ar Foz Don-Tre?

Lavared a reas Porhellig e vefe ar gwella plas an hini ma oa eun Olifant, just a-raog ma kouezfe e-barz, nemed tro-dro eun troatad pelloh.

"Med neuze e welfe ahanom o kleuza anezi," a lavaras

Pou.

"Nompaz ma vefe o selled ouz an oabl."

"Difiziañs e-nefe," a lavaras Pou, "ma c'hoarvezfe gantañ da zelled d'an traoñ." En em zoñjal a reas e-pad pell-tre, hag e lavaras ouspenn, tristig, "N'eo ket kén êz ha ma soñje din. Me gav din ez eo en abeg d'an dra-ze ne vez tapet biskoaz Ofilanted, tost-da-vad."

"Sur a-walh," a lavaras Porhellig.

Huanadi a rejont, ha da zevel; ha p'o-doa tennet eun nebeud drein lann euz o hrohen, eh azezjont adarre; hag e lavare Pou dezañ e-unan dibaouez, "Ma hellfen kavoud eur menoz bennag!" Rag e oa sur e hellfe eur Penn Akuit-Tre dond a-benn da dapoud eun Ofilant, ma anavezfe an doare reiz d'ober."

"Lakaom," a lavaras da Borhellig, "az-pefe c'hoant da dapoud ahanon, penaoz e rafes?"

"Ma," a lavaras Porhellig, "ober a rafen evel-se. Ober a rafen eun Trap, hag e lakafen eur Podad Mél en Trap, hag e santfes anezañ, hag ez afes e-barz evid tapoud anezañ, ha..."


"Hag ez afen e-barz evid tapoud anezañ," a lavaras Pou, entanet, "med gand aket braz evid chom heb beza gloazet, hag e tapfen ar Podad Mél, hag e lipfen ar bordou da genta, oh ober van ne chomfe ket kén, gouzoud a rez, ha neuze ez afen er-mêz hag e soñjfen diwar-ze eur pennadig, ha neuze e teufen en-dro hag e krogfen da lipad kreiz ar podad, ha neuze..."

"Ya arabad en em chala evid se. Aze e vefes, hag aze e tapfen ahanout. Bremañ, ar henta tra da zoñjal diwar e benn a zo. Petra a blij d'an Ofilanted? Piz-moh, a zoñjfen, ne gav ket dit? Ni a glasko eur bern anezo ...E! Pou, di-hun 'ta!"

Pou, hag a oa eet e-barz eun huñvre laouen, a zihunas a-daol-trumm, hag a lavaras e oa kalz gwelloh lakaad mél en eun trap eged piz-moh. Porhellig ne gave ket dezañ; hag e oa just cheu o vond da zevel etrezo diwar-benn-ze, pa zeuas da zoñj da Borhellig, ma vefe lakeet piz-moh e-barz an Trap, e vefe red dezañ kavoud ar piz-moh, med ma

lakfent mël, neuze e vefe red da Bou rei eun darn euz e vél dezañ e-unan, neuze e lavaras, "Mad eo, mël neuze," just pa deue ar memez soñj gand Pou, hag a oa o vond da lavared, "Mad eo, piz-moh."

"Mël," a lavaras Porhellig dezañ e-unan evel pa vefe o prederia, evel pa vefe bet divizet da vad. "Kleuza a rin ar foz, tra ma'z i da gerhad ar mël".



"Mad-tre," a lavaras Pou, hag eñ kuit en eur jilgammad. A-benn ma oa erru er gêr, ez eas d'an armelig-boued hag e pignas war eur gador hag e kemeras eur podad mël braz a oa war an estajerenn uhella. MEL a oa skrivet warnañ, med, just evid beza sur, e tennas kuit ar golo paper hag e sellas outañ, hag e oa just heñvel ouz mël. "Med n'heller jamez gouzoud," a lavaras Pou. "Soñj ameus e lavaras eur wech va eontr din-me e-noa gwelet fourmaj-lêz just gand al liou-ze." Neuze e lakaas e deod e-barz, hag e kemeras eul lipadenn vraz. "Ya," emezañ, "mël an hini eo sur. N'eus ket d'en em drompla. Ha mël, me gav din, beteg deun ar pod. Nemed, evel just," a lavaras, "e vefe bet lakeet fourmaj-lêz en deun, just evid farsal. Marteze e vefe gwelloc'h din mond eun tammig pelloh... just kenkaz... e kenkaz ne garfe ket Ofilanted fourmaj-lêz... evel don-me. A!" Hag e reas eun huanadenn

hir. "Ganin ema ar gwir. Mël an hini eo, penn-da-benn beteg an deun."



Pa oa sur e oa mël, e kasas ar podad da Borhellig, ha Porhellig a zellas ouz an neh, euz deun e Foz Don-Tre, hag e lavaras, "Te 'peus anezañ?" ha Pou a lavaras, "Ya, med n'eo ket leun-mad ar pod," hag e stlapas anezañ da Borhellig, ha Porhellig a lavaras, "Nann, n'eo ket leun! 'Peus nemed an dra-ze?" ha Pou a lavaras, "Geo." Pa oa evel-se. Neuze e lakaas Porhellig ar pod e deun ar Foz, hag e krapas er-mêz, hag o-daou d'ar gêr asamblez.



"Ma, nozvez vad, Pou," a lavaras Porhellig, pa oant erruet e ti Pou. Hag en em gavoud a raim warhoaz da veure da hweh eur e-kichenn ar Gwez-Pin, hag e welim ped Ofilant on-no tapet en on Trap."

"Da hweh eur, Porhellig. 'Peus ket eur fiseleñ bennag?"

"Nann. Perag 'peus c'hoant kaoud eur fiseleñ?"

"Evid kas anezo d'ar gêr." "O!... me gav din e teuo an Olifanted ma suteller."

"Lod anezo a deuiio ha lod all ne raint ket. N'heller ja-  
mez gouzoud gand Olifanted.. Mad, nozvez vad!"

"Nozvez vad!"

Ha Porhellig a yeas d'an trot beteg e di DIVENNET E,  
e-pad ma renke Pou e draou evid mond da gousked.

Eun nebeud eurvezioù diwezatoù, just pa oa an noz o  
vond kuit evel dre laer, e tihunas Pou a-daol-trumm, oh en  
em zantoud pounner. Santet e-noa dija an dra-ze gwechou  
'zo, hag e ouie petra oa. Naon e-noa. Neuze ez eas d'an  
armelig-boued, hag e pignas war eur gador hag e klaskas  
tapoud an estajerenn uhella, ha ne gavas ... netra.

"Souezuz eo an dra-ze," a zoñjas. "Gouzoud a ouzon  
em-oa eur podad mél aze. Leun e oa ar pod, leun-chouk,  
hag e oa skrivet MEL warnañ, evid ma ouezfen e oa mél.  
Souezuz-kenañ eo." Neuze e komañsas da vond ha dond,  
en eur en em houlenñ peleh e oa, hag o vouskomz eur  
mouskomz dezañ e-unan. Evel-se e oa:

Souezuz, souezuz-kenañ eo,  
Pa ouzon am-oa mél;  
Pa oa eur skritell warnañ,  
O lavared MEL.

Eur pod leun-chouk da hourlonka,  
Ne ouzon ket da behel eo eet,  
Nann, ne ouzon ket peleh ema ...  
Ma, souezuz eo.

Mouskomz e-noa greet an dra-ze dezañ e-unan evel pa  
vefe o kana, pa zeas soñj dezañ a-daol-trumm, e-noa  
lakeet anezañ e-barz an Trap leun a Finesa evid tapoud an  
Olifant.

"C'hwitell!" a lavaras Pou. "Setu pezh a hoarvez pa  
glasker beza jentil gand Ofilanted." Hag ez eas en-dro d'e  
wele.

Med ne oa ket evid kousked. Ar muia e klaske  
kousked, an nebeuta e helle ober. Klask a reas Konta

Deñved, ar pezh a zo gwechou 'zo eun doare mad evid  
dond a-benn da gousked, ha, pa ne deue ket a-benn, e  
klaskas konta Ofilanted. Ha gwasoh e oa. Peogwir e rede  
dioustu da bodad mél Pou, hag a zebre toud ar mél. E-pad  
eun nebeud munutennou, e chomas gourvezet aze, gwall-  
eüruz, med pa lavaras ar pemp kant seiz ofilant ha pevar-  
ugentved a lipas e javedou, en eur lavared dezañ e-unan,  
"Mél mad-tre an hini eo, n'ouzon ket pegoulz am-eus  
tañvaet unan gwelloc'h," ne oa ket Pou evid gouzañv pelloc'h.  
Lammad a reas er-mêz euz e wele, redeg a reas er-mêz euz  
an ti, hag e redas war-eeun d'ar C'hweh Gwezenn-Bin.



Edo c'hoaz an Heol en e wele, med e oa eur sklêrder  
e-barz an oabl a-uz da Goad ar Hant Devez-Arad hag a  
hañvale diskouez e oa o tihuni hag e oa o vond da zisteurel  
an dillad-gwele. En amhoulou e oa ar Gwez-Pin evel pa  
vefent yén ha digenvez, hag ar Foz Don-Tre a hañvale  
donnoh eged na oa, ha podad mél Pou en deun a oa eun  
dra visteriuz, eur stumm ha netra kén. Med pa zeue tostoh  
outañ, e lavare dezañ e fri e oa mél, sur, hag e teuas e deod  
er-mêz hag e krogas da lakaad e henou da lufra en a-raog.





"C'hwitell!" a lavaras Pou, pa lakaas e fri e-barz ar pod. "Debret eo bet gand eun Ofilant!" Ha neuze en em zoñjas eun tamm bihan hag e lavaras, "O! n'eo ket, me an hini e-neus debret. Dizoñjet am-oa. "Gwir eo e-noa debret al lodenn vrasa anezañ. Med e chome eun tamm bihan e deun donna, hag e vountas e benn a-béz, hag e komañsas da lipad..."



A-benn nebeud amzer e tihune Porhellig. A-benn ma tihunas en em lavaras, "O!" a lavaras kaloneg, "Ya", ha neuze, kalonekoh c'hoaz, "Setu." Med n'em em zante ket kaloneg-tre, rag ar gér a lamme-dilamme en e benn a oa "Ofilanted."

"Ouz petra e tenne eun Ofilant?"

Kriz e oa?


Daoust hag-eñ e teu pa zuteller? Ha penaoz e teu?

Daoust hag-eñ e-neus joa ouz Perhell, penn-da-benn?

Ma kare Perhell, daoust hag-eñ e ree eun diforh bennag etre ar gouennou perhell?

Lakaom e vefe kriz gand Perhell, daoust-hag-eñ e rafe eun diforh bennag ma 'n-eefe ar Porhell eun tad-koz a veze greet DIVENNET EDERN anezañ? N'anaveze ket ar respont da hini ebed euz ar goulennoù-ze... hag e oa o vond da weled e Ofilant kenta a-benn eun eurvez ahann!

Evel just e vefe Pou gantañ, hag e oa kalz gwelloc'h beza gand e Vignon. Med lakaom e vefe an Ofilanted kriz-kenañ gand Perhell hag Arzed war eun dro? Daoust hag-eñ ne vefe ket gwelloc'h ober van e-nefe poan-benn, ha ne oa ket evid mond d'ar C'hweh Gwezenn-Bin deuz ar beure-mañ? Med ma vefe eun devez brao-tre, ha na vefe Ofilant ebed en trap, e vefe amañ, en e wele e-pad ar beurevez penn-da-benn, ne rafe nemed koll e amzer evid netra. Petra a rankfe ober?





Ha neuze e-noa eur menoz fin. Mond a rafe tre war e bouezig beteg ar C'hweh Gwezenn-Bin bremañ, selled a rafe disfiziuz dre laer e-barz an trap evid gweled ha ne vefe ket eun Ofilant aze. Ha ma vefe unan, ez afe en-dro d'e wele, ha ma ne vefe ket, ne rafe ket.

Neuze ez eas kuit. Da genta e soñjas ne oa Ofilant ebed en trap, ha neuze e soñjas e oa unan, ha pa dostae e oa sur e vefe unan, peogwir e helle kleved anezañ oh olifanta fuloret toud.

"O siwaz, o siwaz, o siwaz!" a lavaras Porhellig dezañ e-unan. Hag eñ e-noa c'hoant tehed. Med memestra, goude beza deuet kén tost, e fellas dezañ gweled penaoz e oa eun Ofilant. Neuze ez eas war-stléj beteg bord an trap hag e sellas e-barz...



Hag e-pad toud an amzer-ze, eh esae Winnie-ar-Pou da denna ar pod-mél a-ziwar e benn. Ar muia e heje anezañ, ar muia e pege anezañ kreñv. "C'hwitell!" a lavaras e-barz ar pod, hag "O, sikour!" hag, aliësoh, "Aiou!" Klask a ree skei anezañ ouz bep seurt traou, med pa ne hellfe ket gweled ouz petra e oa o skei anezañ, ne oa tamm sikour ebed

dezañ; klask a reas krapad er-mêz euz an trap, med pa ne helle gweled netra nemed ar pod, ha pas kalz c'hoaz, ne oa ket evid kavoud e hent. Neuze a-benn ar fin e savas e benn, hag e teuas gantañ eun trouz kreñv, o krozal gand an Dristidigez hag an Dizesper... hag e oa d'ar houlz-se e sellas Porhellig en traoñ.


"Sikour, sikour!" a youhe Porhellig, "eun Ofilant, eun Ofilant euzuz!" hag e reas gaol kén buan ha ma hellas, en eur youhal dibaouez, "Sikour, sikour, eun Ofilant eufuz! Sikouf! Sikouf! Eun eufuz Ozilant!! Sikoul! Sikoul, eun Ofiluz euzant!" Ha ne baouezze ket da youhal na da ober gaol beteg ma erruas e ti Kristofer Robin.

"Petra 'zo erruet ganit, Porhellig?" a lavaras Kristofer Robin, a oa just o tond 'mêz e wele.

"Of," a lavaras Porhellig, en eur denna e alan gand kement a boan ma halle a-boan komz, "eun Of — eun Of — eun Ofilant."

"Peleh?"

"Aze," a lavaras Porhellig, en eur ober sin gand e bao.



"Deuz petra e oa heñvel?"

"Heñvel ...heñvel ... Bez ' e oa gantañ ar brasa penn 'peus gwelet biskoaz, Kristofer Robin. Eun dra braz-spontuz, heñvel ouz ... heñvel ouz tra all ebed er béd. Spontuz-kenañ ... ma!, heñvel ouz... n'ouzon ket ...

heñvel ouz tra all ebed er béd, unan braz-spontuz. Evel eur pod."

"Ma," a lavaras Kristofer Robin, en eur lakaad e votou-lèr, "mond a rin da weled. Deus."

N'e-noa ket aon Porhellig, gand ma oa Kristofer Robin gantañ, hag int kuit...

"Gelloud a ran kleved anezañ, ne rez ket?" a lavaras Porhellig, nehet, pa oant o tostaad.

"Me a hell kleved eun dra bennag," a lavaras Kristofer Robin.



Pou an hini e oa a oa o skei e benn ouz gwriazienn eur wezenn bet kavet gantañ.

"Aze!" a lavaras Porhellig. "Ha n'eo ket spontuz?" Hag e talhe stard dorn Kristofer Robin.

A-daol-trumm e krogas Kristofer Robin da hoarzin.... hag e c'hoarze... hag e c'hoarze... hag e c'hoarze. Ha tra ma oa c'hoaz o c'hoarzin ... Krak! Dond a reas rust penn an Ofilant ouz ar wriazienn, frigasa a reas ar pod, hag e teuas war-wél penn Pou...

Neuze e welas Porhellig nag eur Porhellig Sod e oa bet, hag e-noa kement a véz dioutañ e-unan ma redas war-eeun d'ar gêr, ha d'e wele gand poan-benn. Med Kristofer Robin ha Pou a yeas d'ar gêr assemblez da gaoud o dijuni.

"O, Arz!" a lavaras Kristofer Robin, "Nag e karan ah-nout!"

"Me ivez," a lavaras Pou.

## Pennad c'hweh

### Ennañ e-neus Iañ e zeiz-ha-bloaz hag e vez roet daou brof dezañ

Edo Iañ, an azen koz griz, war vord ar stèr, hag e oa o selled outañ e-unan en dour.

"Fromuz", emezañ. "Setu petra eo. Fromuz."

En em drei a reas hag e kerzas goustadig en eur heulia ar stèr e-pad ugent metrad, patouilla a reas en eur dreuza anezi, hag ez eas goustadig war ar ribl all. Neuze e sellas outañ e-unan en dour adarre.

"Evel ma soñje din," emezañ. "N'eo ket gwelloh deuz an tu-mañ. Med dén ebed ne daol evez. Dén ebed ne daol pléd. Fromuz, setu ar pezh ez eo."

Eur strakadenn a oe e-barz ar radeneg a-dreñv dezañ, ha Pou a deuas er-mêz.

"Demad, Iañ," a lavaras Pou.

"Demad, Arz Pou," a lavaras Iañ, tristig. "Mar deo eun devez mad," emezañ. "Disfiziañs am-eus," emezañ.

"Perag, petra 'zo?"

"Netra, Arz Pou, netra. An oll ahanom ne hellont ket, ha reou 'zo jamez. Setu an afer."

"Ne hellont ket petra?" a lavaras Pou, en eur frota e fri.

"Levenez. Kanaouennou ha dañsou. Plahig an douar nevez, o! hei tou, tra la la!"

"O!" a lavaras Pou. Prederia a reas e-pad eur pennad mad, ha neuze e houlennas, "Peseurt douar nevez an hini eo?"

"Dran-tiz," a lavaras Iañ tristig. "Eur gêr brezoneg o



talvezoud kement ha drantiz," a zisplegas. "Arabad dit soñjal emañ o klemm, med evel-se ema."

Azeza a reas Pou war eur mên braz, hag e klaskas prederia diwar an dra-ze. Evel eun divinidadell e oa evitañ, ha ne oa bet biskoaz dreist evid an divinidadellou, pa oa anezañ eun Arz bihan-tre e benn. Neuze en em lakaas da gana:



Kouignaoua, kouign Pipi,  
N'am-eus bet mann diganti,  
Nemed eur grampouezenn graz  
Hanter-zebret gand ar haz.

Ze oa ar houblad kenta. Pa oe echu gantañ, ne lavaras ket Iañ ne gare ket anezañ e gwirionez, neuze e kanas Pou hegarad-tre an eil koublad dezañ:

Me am-eus eun tiig war ar mêz  
Hag a zo toet gand krampouez;  
E vogeriou zo greet gand yod,  
Al leurzi gand lêz ribot.


Iañ ne rannas grig, neuze e safronas Pou an trede koublad sioul evitañ e-unan:

Pa baro an heol war an to,  
Ma hrampouezenn a grazo.  
Pa gouezo glao war va zi,  
Ez in war-neuñv gand ar gwazi.

"Mad-tre," eme Iañ. "Kan. Tra la la deno. Marijanig lagad-bran. Kemer da blijadur."

"Ober a ran," eme Iañ.

"Reou zo a hell," eme Iañ.



"Petra 'zo?"  
"Chalet out gand eun dra bennag?"  
"Seblantoud a rez kén trist, Iañ."  
"Trist? Perag e vefen trist? Va deiz-ha-bloaz an hini eo.  
Evurusa devez ar bloavez."  
"Da zeiz-ha-bloaz?" a lavaras Pou, souezet braz.  
"Evel just. Ne welez ket? Sell ouz an oll brofou am-eus  
bet." Diskouez a ree gand e droad euz an eil tu d'egile.  
"Sell ouz gwastell va deiz-ha-bloaz. Goulou-koar ha sukr  
ruz-roz."  
Selled a reas Pou — da genta deuz an tu dehou ha  
neuze deuz an tu kleiz.  
"Profou?" a lavaras Pou. "Gwastell deiz-ha-bloaz?" a  
lavaras Pou. "Peleh?"  
"Ne welez ket anezo?"  
"Nann," a lavaras Pou.  
"Na me kennebeud," eme Iañ. "Eur farsadenn," a  
zisklerias. "A! A!"  
Skraba a reas Pou e benn, kollet e benn eun tammig  
gantañ.  
"Med daoust hag-eñ ema hirio da zeiz-ha-bloaz evid  
gwir?" a houlennas.  
"Ya."  
"O! Heti a ran dit eun deiz-ha-bloaz euz ar henta, Iañ."  
"Hag eun deiz-ha-bloaz laouen-tre dit-te, Arz Pou."  
"Med n'eo ket va deiz-ha-bloaz."  
"Nann. Va-hini din-me eo."  
"Med 'peus lavaret 'Deiz-ha-bloaz laouen-tre'..."

"Ma! Perag ket? Ne fell ket dit beza gwallevuruz evid  
va deiz-ha-bloaz, n'eo ket 'ta?"

"O, gweled a ran," a lavaras Pou.

"Fall a-walh eo," eme Iañ, prest da ouela, "trist eo dija  
evidon beza trist, heb profou hag heb gwastell hag heb  
goulou-koar, heb eur gér bennag diwar va fenn, med ma  
teu ar re all da veza trist ivez..."

Re e oa evid Pou. "Chom aze!" a youhas da Iañ, tra ma  
troe hag ez ee d'ar gêr ar buanna posubl; rag e sante e  
ranke kaoud eur prof bennag evid Iañ dioustu, hag e hellfe  
soñjal diwar-benn unan bravoh diwezatah.

Dirag e di e kavas Porhellig, o lammad-dilammad evid  
klask tapoud ar morzol.

"Demad, Porhellig," a lavaras.

"Demad, Pou," a lavaras Porhellig.

"Petra emaut o klask ober?"



"Edon o klask tapoud ar morzol," a lavaras Porhellig.  
"E oan just o tremen..."

"Laosk ahanon hen ober evidout," a lavaras Pou  
hegarad. Neuze e tapas ar morzol hag e skoas ouz an nor.  
"Emaon o paouez gweled Iañ," a gomañsas da lavared,  
"hag ar paour-kêz Iañ a zo trist-kenañ, peogwir ez eo e  
zeiz-ha-bloaz, ha dén ebed n'e-neus taolet pléd, ha teñval  
eo e benn — gouzoud a rez penaoz ema Iañ — ha setu

penaoz e oa, ha ... Med pegen pell emañ an hini a zo o chom amañ da zond beteg an nor." Hag e skoas adarre.

"Med Pou," a lavaras Porhellig, "da di an hini eo!"

"O!" a lavaras Pou. "Gwir eo," emezañ. "Mad, eom e-barz."

Mond a rejont e-barz. Kenta tra a reas Pou a oe mond d'ar ganastell da weled hag-eñ e chome c'hoaz eur podadig mél; hag e chome unan, hag e kemeras anezañ.

"Me a roio an dra-ze da Iañ," a zisklerias, "evel prof. Petra emañ e soñj da rei dezañ?"

"Daoust-hag-eñ ne hellfen ket rei anezañ ivez?" a lavaras Porhellig. "Diganeom-ni on-daou."



"Pas," a lavaras Pou. "Ne vefe ket eun doare mad d'ober."

"Mad eo, neuze, eur balon a roin dezañ. Unan a chom ganin deuz an abadenn-ouél. Mond a ran da gerhad anezañ bremañ, neketa?"

"Ze zo eur menoz dreist, Porhellig. Ze zo just ar pezh e-neus ezomm Iañ anezañ evid beza frealzet. Gand eur balon, ne hell dén chom dilevenez."

Neuze ez eas kuit Porhellig d'an trot; ha Pou a yeas deuz an tu all gand e bodad-mél.

Tomm e oa an devez, hag eur veaj hir e-noa d'ober. N'e-noa ket greet an hanter euz an hent, pa grogas eur zantadenn iskiz d'en em zila ennañ. Komañs a reas e penn e fri, hag e redas drezañ hag ez eas er-mêz dre blantou e dreid. Ze a oa evel pa vefe unan bennag ennañ o lavared dezañ, "Bremañ neuze, Pou, deuet eo poent debri eur genaouad bihan."



"Siwaz, siwaz," a lavaras Pou, "ne ouien ket e oa kén diwezd." Neuze eh azezas hag e tennas kuit golo e bodad-mél. "Evuruzamant em-eus degaset anezañ ganin," a zoñjas. "Meur a arz o vond er-mêz gand eun devez ken tomm hag hennez n'o-dije ket soñjet degas ganto eun draig ben-nag." Hag eñ krog da zebri.



"Bremañ," a zoñjas tra ma tape lipadenn diweza ar podad, "da beleh e oan o vond? A! ya, Iañ." Hag e savas goustadig.

Ha neuze, a-daol-trumm, e teuas soñj dezañ. Debret e oa bet gantañ prof deiz-ha-bloaz Iañ!



"C'hwitell!" a lavaras Pou. "Petra a rin? Red eo din rei eun dra bennag dezañ."

E-pad eur pennadig amzer ne oa ket evid soñjal e tra ebed. Neuze e soñjas: "Ma, eur pod brao-tre an hini eo,

memez ma n'eus tamm mé! ebed e-barz, ha ma vefe gwalhet prop ganin, ha ma lakaan unan bennag da skriva 'Deiz-ha-bloaz laouen' warnañ, e hellfe Iañ lakaad traou e-barz ... neuze e vefe mad dezañ." Neuze, pa oa o tremen e-kichenn ar Hoad Kant Devez-Arad, ez eas e-barz da vizita Kaouenn, a veve eno.

"Demad, Kaouenn," emezañ.

"Demad, Pou," a lavaras Kaouenn.

"Deiz-ha-bloaz evuruz da Iañ," a lavaras Pou.

"O, an dra-ze an hini eo?"

"Petra emhout o vond da rei dezañ, Kaouenn?"

"Petra emhout -te o vond da rei dezañ, Pou?"

"Emaon o vond da rei dezañ eur Pod Mad da Lakaad Traou E-barz, hag em-oa c'hoant da houlenn diganit ..."  
"An dra-ze eo?" a lavaras Kaouenn, en eur dapoud anezañ euz pao Pou.

"Ya, hag em-oa c'hoant goulenn diganit ..."

"Mé! a oa bet lakeet e-barz gand unan bennag," a lavaras Kaouenn.

"Moyen zo da vired n'eus forz petra e-barz," a lavaras Pou, tan ennañ. Talvouduz-kenañ eo evid se. Hag em-oa c'hoant goulenn diganit..."

"Bez' e tleves skriva 'Deiz-ha-Bloaz laouen' warnañ."

"Setu ar pezh a felle ganin goulenn diganit," a lavaras Pou.

"Peogwir n'on ket sur deuz va doare-skriva. Unan mad an hini eo, med etre daou e chom, hag e ya al lizerennou e plasou n'int ket mad evito. Ha te a hellfe skriva 'Eun deiz-ha-bloaz laouen' warnañ em flas?"

"Eur pod brao eo," a lavaras Kaouenn, en eur zelled outañ a-dost. "Ne hellfen ket rei anezañ me ivez? Euz on perzh deom-ni on-daou?"

"Nann," a lavaras Pou. "Ne vefe ket eun doare mad. Bremañ emeon o vond da walhi anezañ da genta, ha goude e helli skriva warnañ."

Neuze e walhas ar pod, hag e sehas anezañ, tra ma oa Kaouenn o lipad penn e greion, oh en em houlenn penaoz an diaoul skriva "Deiz-ha-Bloaz".

"Daoust hag-eñ e hellez lenn, Pou?" a houlennas, nehet tamm-pe-damm. "Eur skritellig diwar-benn skei ha seni a zo war va dor, bet skrivet gand Kristofer Robin. Gouest e vefes da lenn anezi?"

"Lavaret 'n-oa din Kristofer Robin petra oa skrivet, ha neuze e hellfen lenn."

Mad, lavared a rin dit ar pezh a zo skrivet, ha neuze e vi gouest da lenn."

Neuze e skrivas Kaouenn... ha setu ar pezh e-noa skrivet:

### DIZ DZEI A BLOZ BOLAZ LUENN LOENN

Bamet e chomas Pou dirag Kaouenn.



"Skrivet em-eus 'Deiz-ha-Bloaz laouen', ha netra kén, a lavaras Kaouenn dievez.

"Hir-mad eo," a lavaras Pou, skoet da vad.

"E gwirionez, emeon o lavared 'Eun Deiz-ha-Bloaz laouen-tre a-berz Pou.' Evel just, e vez red implijoud kalz a greion evid lavared eun dra kén hir hag hemañ."

"O! Gweled a ran," a lavaras Pou.

Tra ma c'hoarveze an oll draou-ze, e oa eet en-dro Porhellig d'ar gêr da gerhad balon Iañ. Derhel a ree anezañ stard-kenañ outañ, evid na nijfe ket, hag e rede ken buan ha ma halle evid en em gaved gand Iañ a-raog Pou; rag e felle dezañ beza an hini kenta o rei eur prof, evel pa vefe deut ar menoz dezañ e-unan-penn. Ha pa oa o reded, hag o

soñjal pegen laouen e vefe Iañ, ne welas ket peleh e oa o vond... hag a-daol-trumm e lakaas e droad en eun toull-konikl, hag e kouezas a-stok e gorv.



STRAK!!!???\*\*\*!!!!

War e hourvez e oa Porhellig, oh en em houlen petra a oa c'hoarvezet. Da genta e soñjas e oa tarzet ar béd a-bez; ha goude e soñjas ne oa marteze nemed an darn leh ma oa ar Hoad; ha neuze e soñjas ne oa marteze nemetañ e-unan, ha neuze e oa e-unan-penn e-barz al loar pe en eul leh all bennag, ha ne welfe ket kén biken Kristofer Robin pe Pou pe Iañ adarre. Ha neuze e soñjas, "Ma, memez m'emaon e-barz al loar, n'eo ket red din beza a-stok va horv a-héd an amzer," neuze e savas gand evez hag e sellas en-dro dezañ.

Edo c'hoaz er hoad!

"Ma, ze zo iskiz," a zoñjas-eñ. En em houlen a ran petra oa an trouz braz-se. N'hallfen ket beza greet eur seurt trouz en eur goueza. Ha peleh ema va balon? Ha petra eo an tamm pillou gléb-se?"

Ar balon an hini e oa!

"O! ma Doue!" a lavaras Porhellig. "O, ma Doue, o Doue, Doue, Doue!! Ma, re ziwezd eo bremañ. N'hallan ket mond war va hiz, ha n'eus balon all ebed ganin, ha marteze ne blij ket kement-se ar balonou da Iañ."

Neuze ez eas pelloh d'an trot, trist kentoh, hag e tiskennas war ribl ar stèr leh ma oa Iañ, hag e huchas warnañ.

"Demad, Iañ," a huchas Porhellig.

"Demad, Porhellig karet," eme Iañ. "Mard eo eun devez mad," emezañ. "Diskredi a ran," emezañ. "Ne vern," emezañ.

"Deiz-ha-bloaz laouen," a lavaras Porhellig, deuet tostoh bremañ.

Paouez a reas Iañ da zelled outañ e-unan e-barz ar stèr, hag en em droas evid selled sonn ouz Porhellig.

"Lavar an dra-ze adarre," emezañ.

"Deiz-ha-..."

"Gortoz eur vunutenn."



En eur vrañsigellad war deir garr, e komañsas da gas e bederved garr beteg e skouarn, gand kalz a evez. "Greet em-oa an dra-ze deh," a zisklerias, pa goueze evid an drede gwech. "Ez-tre eo. Ober a ran an dra-ze evid kleved ahanout gwelloh... Setu, deuet on a-benn! Bremañ, petra e oas o lavared?" Bounta a reas e skouarn en a-raog gand e droad.

"Deiz-ha-bloaz laouen," a lavaras Porhellig adarre.

"Kaoz 'zo deuson?"

"Evel just, Iañ."

"Va deiz-ha-bloaz?"

"Ya."

"Va gwir deiz-ha-bloaz an hini eo?"

"Ya, Iañ, hag em-eus kaset eur prof dit."

Tenna a reas Iañ e droad dehou deuz e skouarn dehou, en em droas, ha gand poan vraz e savas e droad kleiz.

"Er skouarn all e tlean digemer anezañ," emezañ.



"Bremañ, lavar."

"Eur prof," a lavaras Porhellig kreñv-tre.

"Evidon-me adarre?"

"Ya."

"Va deiz-ha-bloaz c'hoaz?"

"Ya, Iañ, hag em-eus kaset eur balon dit."

"Eur balon?" eme Iañ. "Te 'peus lavaret eur balon? Unan euz an traou braz livet a vez c'hwezet e-barz? Plijadur, Meurlarjez, setu-ni amañ ha setu?"

"Ya, 'm-eus aon — digarez ahanon, Iañ — med pa oan o redeg evid kas anezañ dit, ez on kouezet."

"Doue, Doue, pebez droug-chañs! Re vuan 'peus redet, me gréd. N'eus ket c'hoarvezet droug ganit, Porhellig karet?"

"Nann, med me ... me O! Iañ, lakeet 'm-eus ar balon da darza!"

Didrouz e chomjont e-pad pell.

"Va balon?" eme Iañ a-benn ar fin.

Lavared a reas 'ya' Porhellig gand e benn.

"Balon va deiz-ha-bloaz?"



"Ya, Iañ," a lavaras Porhellig, en eur zuhellad. "Setu anezañ. Gand ... gand eun deiz-ha-bloaz laouen." Hag e roas an tamm pillou gléb da Iañ.

"An dra-ze eo?" eme Iañ, souezet tamm-pe-damm.

Lavared a reas 'ya' Porhellig gand e benn.

"Va frof?"

Lavared a reas 'ya' Porhellig a-nevez gand e benn.

"Ar balon?"

"Ya."

"Trugarez, Porhellig," eme Iañ. "Spi am-eus ne vi ket jenet," a lavaras c'hoaz, "med pe liou e oa ar balon-ze pa ... pa oa eur balon?"

"Ruz."

"Me felle din just gouzoud... Ruz," a vouskomzas dezañ e-unan. "Al liou a blij din ar muia... Braz penaoz e oa?"

"Kén braz ha me, pe war-dro."

"En em houlenn a reen... Kén braz ha Porhellig pe war-dro," emezañ dezañ e-unan, tristig. "Ar vent a blij din ar muia. Mad, mad."

Gwallevuruz-kenañ en em zante Porhellig, ha ne ouie ket petra lavared. Edo just o paouez digeri e henou evid lavared eun dra bennag, ha neuze e reas e zoñj ne oa ket mad lavared an dra-ze, pa glevas eur youhadenn o tond euz tu all ar stèr, ha Pou an hini e oa.

"Deiz-ha-bloaz laouen," a huchas Pou, e-noa dizoñjet e-noa lavaret dija.

"Trugarez, Pou, greet eo dija," eme Iañ tristig.

"Kaset 'm-eus dit eur prof bihan," a lavaras Pou, tan ennañ.

"Me 'm-eus bet anezañ," eme Iañ.

Treuzet e-noa Pou ar stèr en eur lakaad an dour da strinka evid mond beteg Iañ, ha Porhellig a oa en e goazez eun tammig pelloh, e benn etre baoiou, en eur zuhellad dezañ e-unan.

"Ze 'zo eur Pod talvouduz," a lavaras Pou. "Setu-eñ. Ha skrivet 'z eus bet warnañ 'Deiz-ha-Bloaz laouen a-berz Pou, gand karantez'. Setu pezh a dalv ar skrid hir-ze. Evid lakaad traou e-barz an hini eo. Setu!"

Pa welas Iañ ar pod, e oe enervet braz.

"O! emezañ. "Me gav din ez aio va Balon just e-barz ar Pod."

"O, ne raio ket, Iañ," a lavaras Pou. "Re vraz eo ar Baloniou evid mond e-barz Podou. Ar pezh a reer gand eur balon eo derhel ar balon ..."

"Pas va hini," eme Iañ, lorch ennañ. "Sell, Porhellig!" Ha tra ma selle Porhellig, tristidig, en-dro dezañ, e tapas

Iañ ar balon gand e zent, hag e lakeas anezañ e-barz ar pod en eur zerhel evez braz; a adaptas anezañ hag a lakeas anezañ war an douar; ha neuze e tapas anezañ adarre hag e lakeas anezañ a-nevez e-barz ar pod, gand evez braz.

"Ganit ema ar gwir!" a lavaras Pou. "Mond a ra e-barz!"

"Ganit ema ar gwir!" a lavaras Porhellig. "Hag e teu er-mêz euz ar pod!"

"N'eo ket gwir?" eme Iaň. "Mond a ra e-barz hag e teu er-mêz êz-tre."

"Laouen-braz on," a lavaras Pou, laouen, "pa 'm-oa bet soňj rei dit eur Pod talvouduz evid lakaad traou e-barz."

"Laouen-braz on," a lavaras Porhellig, laouen, pa 'm-oa bet soňj rei dit eun Dra evid lakaad anezañ e-barz eur Pod talvouduz."

Ne zelaoue ket Iaň avad. Edo o tenna ar balon er-mêz, hag o lakaad anezañ e-barz, kén evuruz ha ma oa...

\* \* \*



"Ha n'am-oa roet netra dezaň?" a houlennas Kristofer Robin, tristig.

"Evel just az-poa," emezon. "Roet 'poa dezaň — 'peus ket soňj ... eun dra vihan ... eun dra vihan ..."

"Roet em-oa dezaň eur voestad livajou evid liva traou ganto."

"Gwir eo."

"Perag n'am-oa ket roet anezi dezaň diouz ar beure?"

"Dever a-walh a oa warnon evid ma vefe prest ar fest evitaň. Eur wastell a oa, gand sukr warni ha teir gou-laouenn-goar, hag e ano e sukr ruz-roz, ha..."

"Ya, soňj am-eus," a lavaras Kristofer Robin.

## Pennad seiz

### Ennañ e teu Kanga ha Babig Rou d'ar Hoad, ha Porhellig a ya da gibella.

War a zeblant, ne ouie dén euz peleh e teuent, med edont e-barz ar Hoad: Kanga ha Babig Rou. Pa houlennas Pou digand Kristofer Robin, "Penaos e oant deuet amañ?", e lavaras Kristofer Robin, "Evel boaz, ma komprennez pez a lavaran, Pou," ha Pou, na ree ket, a lavaras "O!" Neuze e fiñvas e benn diou wech hag e lavaras, "Evel boaz. A!" Mond a reas neuze da gavoud e vignon Porhellig evid gouzoud petra a zoñje-eñ diwar-benn ze. Hag en em gavas gand Konikl e ti Porhellig. Neuze e komzjont oll asamblez diwar-benn an dra-ze.

"Ar pez na blij ket din diwar-benn an dra-ze eo, an dra-mañ" a lavaras Konikl. "Setu-ni .. te, Pou, ha te, Porhellig, ha Me ... hag a-daol-trumm ..."

"Hag Iañ," a lavaras Pou.

"Hag Iañ ... ha neuze a-daol-trumm ..."

"Ha Kaouenn," a lavaras Pou.

"Ha Kaouenn ... ha neuze a-daol-trumm ..."

"O, hag Iañ," a lavaras Pou. "Edon o vond da zizoñjal anezañ."

"Setu-ni," a lavaras Konikl goustadig ha gand evez, "an oll ahanom, ha neuze, a-daol-trumm, pa zihunom diouz eur beure, ha petra a gavom? Kavoud a reom eul Loen Iskiz en on touez. Eul loen n'on-eus klevet netra diwar e



benn en a-raog! Eul loen hag a gas gantañ e famil en e hodell! Lakaom e kasfen ganin va famil e-barz va godell, ped godell a vefe red din kaoud?"

"C'hwezeg," a lavaras Porhellig.

"Seiteg, n'eo ket?" a lavaras Konikl. "Hag unan ouspenn evid eur mouchouer... Triweh godell en eur gwiskamant! Displijuz eo."

E-pad pell e chomjont didrouz oh en em zoñjal... ha neuze Pou, e-noa krizet e dal stard-tre e-pad eun nebeud munutennou, a lavaras: "Me gav pemzeg."

"Petra?" a lavaras Konikl.

"Pemzeg."

"Pemzeg petra?"

"Da famil'."

"Petra 'zo diwar o fenn?"

Frota a reas Pou e fri hag e lavaras e soñje dezañ e-noa komzet Konikl diwar-benn e famil'.

"Me?" a lavaras Konikl, dievez.

"Ya, lavaret az-peus..."

"Ne vern, Pou," a lavaras Porhellig, heb pasianted. "Ar gudenn a zo, petra emao m'o vond da ober gand Kanga?"

"O, kompren a ran," a lavaras Pou.

"Ar gwella," a lavaras Konikl, a vefe an dra-mañ. Ar gwella a vefe laerez Babig Rou ha skoacha anezañ, ha neuze pa lavaro Kanga, 'Peleh ema Babig Rou?', e lavarim, 'Aha!'"

"Aha!!" a lavaras Pou, evid esea. "Aha! Aha!... evel just," a gendalhas, "bez' e hellfem lavared 'Aha!' memez ma n'on-efe ket laeret Babig Rou.

"Pou," a lavaras Konikl hegarad, "n'az-peus penn ebed!"

"Me oar," a lavaras Pou, uvel.

"Lavared a reom 'aha' evid ma ouezfe Kanga e ouzom peleh ema Babig Rou. 'Aha!' a dalv "Lavared a raim dit peleh ema Babig Rou, ma prometev mond kuit euz ar Hoad ha nompaz dond en-dro biken. Bremañ na gomz ket p'emaon o soñjal."

Mond a reas Pou en eur horn hag eh esead lavared 'aha!' evel-se. Gwechou 'zo e talvez ar pez a lavare Konikl, ha gwechou 'zo e seblante dezañ ne ree ket. "Me gav din e vefe red ober eseadennou," a zoñjas-eñ. "En em houlenn a ran hag-eñ e-no Kanga d'ober eseadennou evid kompren anezañ ive."

"N'eus nemed eun dra," a lavaras Porhellig, nervuz eun tamm. "Edon o komz ouz Kristofer Robin, hag e lavaras e


veze sellet ouz ar Hanga evel ouz unan euz al loened ar hrise. 'M-eus ket aon rag al loened kriz dre vraz, med e vez gouezet mad ma vez tennet kuit e re yaouank diouz unan al loened kriz, e teu da veza kén kriz ha daou euz al loened krise. Neuze 'Aha!' a zo marteze eun dra diod da lavared.

"Porhellig," a lavaras Konikl, en eur gemer eur hreion, hag en eur lipad ar penn anezañ, "n'az-peus kalon ebed."

"Diêz eo kaoud kalon," a lavaras Porhellig, en eur zuhellad eun tamm bihan, "ma n'eus ahanout nemed eul loen bihan-tre."

"Konikl, hag a oa krog da skriva buan-ha-buan, a zellas outañ hag a lavaras:

"Peogwir ez eus ahanout eul loen bihan-tre, an hini eo e vi talvouduz-tre en abadenn a zo dirazom."



Ken enervet e oa Porhellig o soñjal e vefe talvouduz ma tizoñjas beza spontet muioh, ha pa deuas Konikl da lavared ne oa kriz ar Hangaed nemed e-pad ar miziou goañv, o veza hegarad er miziou all, e helle a-boan chom azezet sioul, kén braz e oa e hoant da veza talvouduz dioustu.

"Ha me?" a lavaras Pou tristig. Me gav din ne vin ket talvouduz?"

"Bez' sioul, Pou," a lavaras Porhellig, o rei startijenn dezañ. "Eur wech all marteze."

"Heb Pou," a lavaras Konikl war an ton braz en eur lemma e greion, "an abadenn a vefe dibosubl."

"O!" a lavaras Porhellig, hag e klaskas chom heb diskouez e oa dipitet. Med Pou a yeas en eur horn euz ar zal hag e lavaras dezañ e-unan gand lorch, "Dibosubl heb-don! Eun arz evel ma'z on!"

"Bremañ selaouit oll," a lavaras Konikl pa oa echu gantañ skriva, ha Pou ha Porhellig a azezas evid selaou, c'hoant braz enno, digor ganto o genouiou. Setu ar pezh a lennas Konikl a vouez uhel:

### RAKTRES EVID TAPOUD BABIG ROU

1. *Eveziadennou dre vraz.* Redeg a ra Kanga buannoh eged forz pehini ahanom, memez Egedon.

2. *Eveziadennou dre vraz ouspenn.* Ne deh jamez daoulagad Kanga diouz Babig Rou, nemed pa vez boutonet e surentez en he godell.

3. *Neuze.* Ma fell deom tapoud Rou, e tleom kemered lañs war Ganga, pa réd Kanga buannoh eged n'eus forz pehini ahanom, memez Egedon. (*Selled ouz 1.*)

4. *Eur menoz.* Ma lammfe Rou er-mêz euz godell Kanga ha ma lammfe Porhellig e-barz, ne vefe ket Kanga evid gweled an diforh, pa vez Porhellig eul loen bihan-tre.

5. Evel Rou.

6. Med da genta e vefe red ma sellfe Kanga diouz an tu all, evid na wellfe ket Porhellig o lammad e-barz.


7. Selled ouz 2.

8. *Eur menoz all.* Med ma komzfe Pou outañ, tan ennañ, e sellfe marteze ouz eun tu all e-pad eur pennad.

9. Ha neuze e hellfen redeg kuit gand Rou.

10. Buan.

11. *Ha Kanga ne gavfe an diforh nemed pell goude.*



Ma, Konikl a lennas an dra-ze, lorch ennañ, hag e-pad eur pennadig amzer goude m'e-noa lennet anezañ, dén ne rannas grig. Ha neuze, Porhellig, a oa bet o tigeri hag o serri e henou en heb ober an disterra trouz, a deuas a-benn da lavared gand eur vouez raouliet-tre:

"Ha ... Goude?"

"Petra a fell dit lavared?"

"Pa zizolio Kanga an diforh?"

"Neuze e lavarim oll 'Aha!'"

"On-tri?"

"Ya."

"O!"

"Petra a laka ahanout diêz, Porhellig?"

"Netra," a lavaras Porhellig, "gand ma vo lavaret gand on-tri. Gand ma vo lavaret gand on-tri," a lavaras Porhellig, "Ne vern," emezañ, "med ne garfen ket lavared 'Aha!' va-unan-penn. Ne zonfe ket kén brao, nag a bell. Etre diou gaoz," emezañ, "sur out penn-da-benn diwar-benn ar pezh 'peus lavaret diwar-benn ar miziou goañv?"

"Ar miziou goañv?"

"Ya, n'eo kriz nemed e-pad ar miziou goañv?"

"O! ya, ya, gwir-kenañ eo. Ma, Pou? Kompren a rez ar pezh az-peus d'ober?"

"Ne ran ket," a lavaras Arz Pou.  
 "Pas c'hoaz," emezañ.  
 "Petra am-mo da ober?"  
 "Ma, n'az-po nemed komz garo-tre ouz Kanga, evid na remerko mann ebed."  
 "O! Diwar-benn petra?"  
 "Diwar-benn n'eus forz petra a blijjo dit."  
 "Te a fell dit lavared eur barzoneg bihan pe eun dra bennag heñvel?"  
 "Setu," a lavaras Konikl. "Mad-tre. Bremañ, deus."  
 Neuze ez eas kuit an oll re anezo evid klask Kanga.  
 Kanga ha Rou a oa o tremen eun abardaevez sioul en eul lodenn euz ar Hoad leh ma oa trêz. Babig Rou a oa o klask deski ober lammou bihan e-barz an trêz, o koueza e-barz toullou logod hag o skrapad er-mêz anezo, ha Kanga, enervet, a oa o fiñval hag o lared: "Eul lamm c'hoaz nemetken, Loulig, ha neuze e vo red deom mond d'ar gêr." Ha d'ar poent-se, piou a skrimpas gand ar grapenn en eur jilgammad, nemed Pou an hini e oa.  
 "Demad, Kanga."  
 "Demad, Pou."  
 "Sell ouzin o lammad," a wihas Rou, hag e kouezas e-barz eun toull logod all.



"Salud, Rou, ma mignon bihan karet!"  
 "Edom just o vond d'ar gêr," a lavaras Kanga. "Salud, Konikl. Salud, Porhellig."  
 Konikl ha Porhellig, a oa deut bremañ war-wél euz tu all an dorgenn, a lavaras "Salud," ha "Salud, Rou," ha Rou a houlennas diganto selled outañ o lammad, hag indi neuze da jom aze ha da zelled outañ.  
 Ha Kanga da zelled ivez...  
 "O, Kanga," a lavaras Pou, goude m'e-noa greet Konikl daou zerr-lagad dezañ, "N'ouzon ket hag intereset out gand ar varzoniez evid gwir?"  
 "Tamm ebed tost-da-vad," a lavaras Kanga.  
 "O!," a lavaras Pou.  
 "Rou karet, eul lamm diweza nemetken, ha neuze e vo red deom mond d'ar gêr."  
 Pell e chomas mud an oll re, pa gouezas Rou e-barz eun toull-logod all.  
 "Dalhom da vond," a lavaras Konikl, en eur vouskomz kreñv a-dreñv e bao.  
 "Pa oa kaoz euz barzoniez," a lavaras Pou, savet 'm-eus eur pezh bihan pa oan o tond amañ. Evel-se e oa. Eu ... ma klaskin e-barz va memor ..."  
 "Gwir eo!" a lavaras Kanga. "Bremañ, Rou karet ..."  
 "Plijoud a raio dit ar barzoneg-se," a lavaras Konikl.  
 "Plijoud a raio kalz dit," a lavaras Porhellig.  
 "Red e vo dit selaou gand evez braz," a lavaras Konikl.  
 "Evid nompaz mankoud tamm ebed anezañ," a lavaras Porhellig.  
 "O, ya," a lavaras Kanga, med e selle c'hoaz ouz Babig Rou.  
 "Penaos e oa, Pou?" a lavaras Konikl.  
 Pasaad a reas Pou eun tammig, hag e komañsas.

BARZONEG BET SAVET GAND EUN ARZ,  
EUR PENN DISTER DEZAÑ

D'al lun, pa vez tomm an heol  
En em houlenn kalz a ran:  
"Bremañ ez eo gwir, pe n'eo ket,  
"Petra eo an dra-ze, hag an dra-ze petra eo?"

D'ar meurzh, pa ra grizill hag erh,  
Me gav din muioh-mui  
Ne oar dén tost-da-vad  
Hag-eñ emma ar re-mañ evel-se pe ar re-se evel-henn.

D'ar merher, pa vez glaz an oabl,  
Ha n'am-eus netra all da ober,  
Gwechou 'zo en em houlennan hag-eñ ez eo gwir  
Piou a zo petra ha petra a zo piou.

D'ar yaou, pa grog da rèvi  
Pa steredenn ar reo-gwenn war ar gwéz,  
Penaos e hell unan bennag gweled  
Ez eo ar re-mañ da biou ... med da biou eo ar re-mañ?

D'ar gwener ...

"Ya, êz eo, n'eo ket?" a lavaras Kanga, heb gortoz ar  
pez a oa erruet d'ar gwener. "Eul lamm c'hoaz nemetken,  
Rou karet, ha neuze e vo poent braz deom mond d'ar  
gêr."

Konikl a roas buan da Bou eun taol-ilin .

"Pa zo kaoz euz barzoniez," a lavaras Pou buan,  
"remerket 'peus ar wezenn-mañ just aze?"

"Peleh?" a lavaras Kanga. "Bremañ, Rou..."

"Just aze," a lavaras Pou, en eur ziskouez eur plas a-  
dreñv kein Kanga.

"M-eus ket," a lavaras Kanga. "Bremañ lamm e-barz,  
Rou karet, hag ez aim d'ar gêr."



"Bez' e tleves selled ouz ar wezenn-ze aze," a lavaras  
Konikl. "Lakaad a rin ahanout e-barz, Rou?" Hag e keme-  
ras Pou e-barz e baoiou.

"Gelloud a ran gweled eul labous enni deuz amañ," a  
lavaras Pou. "Marteze ez eo eur pesk."

"N'eo ket eur pesk, eul labous an hini eo," a lavaras  
Porhellig.

"Gwir eo," a lavaras Konikl.

"Daoust hag-eñ ez eo eun dred pe eur voualh?" a  
lavaras Pou.

"Se 'zo ar gudenn," a lavaras Konikl. "Eun dred pe eur  
voualh an hini eo?"

Ha neuze a-benn ar fin e troas Kanga he fenn evid  
gweled. Ha just pa oa troet he fenn, e lavaras Konikl gand  
eur vouez kreñv : "Kê e-barz, Rou!" hag e lammas Porhel-  
lig e-barz godell Kanga, hag e reas gaol Konikl, gand Rou  
e-barz e baoiou, kén buan ha ma helle.

"Sell 'ta, peleh emma Konikl?" a lavaras Kanga, o selled  
war e giz. "En da êz emmaout, Rou karet?"

Gwihal a reas Porhellig evel ma ree Rou euz foñs  
godell Kanga.

"Red e oa da Gonikl mond kuit," a lavaras Pou. "Me  
gav din e teuas soñj dezañ a-daol-trumm e-noa da zoursial  
diwar-benn eun dra bennag."

"Ha Porhellig?"

"Me gav din e soñjas Porhellig en eun dra bennag just d'ar memez amzer. A-daol-trumm."


"Neuze, red eo dim mond d'ar gêr," a lavaras Kanga. "Kenavo, Pou." Ha gand tri lamm braz, e oa eet diwarwel.

Selled a reas Pou outi pa oa o vond kuit.

"Me garfe lammad evel-se," a zoñjas-eñ. "Reou 'zo a hell ha reou 'zo ne hellont ket. Evel-se ema."

Med gwechou 'zo e-nije karet Konikl ne vefe ket bet Kanga evid ober. Aliez, pa oa bet red dezañ kerzed e-pad pell evid mond d'ar gêr a-dreuz ar Hoad, e-noa bet c'hoant beza eul labous; med bremañ e soñje a-stroñs e foñs godell Kanga,

deo  
"Mar nijal an dra-ze, hellin gouzañv."  
njal ne biken



Ha pa lamme en êr, e lavare, "Oooooo!" ha pa ziskenne e lavare, "Ayou!" Ha ne baouezet ket da lavared, "Ooooo-ayou, Oooo-ayou" penn-da-benn a-héd an hent da di Kanga.

Evel just, pa ziboutonas Kanga he godell, e welas dioustu petra a oa c'hoarvezet. Spontet e oe e-pad eun nebeudig amzer, med neuze e oe dinehet; rag e oa sur ne bermetfe ket Kristofer Robin ma vefe greet droug ebed da Rou. Neuze en em lavaraš, "Ma fell dezo ober eur farsa-


denn din, e rin eur farsadenn dezo."

"Bremañ, Rou karet," a lavaras en eur denna kuit Porhellig er-mêz euz he godell. "Poent eo mond da gousked."

"Aha!" a lavaras Porhellig, kén mad ha ma halle goude e veaj spontuz. Med ne oa ket eun "Aha!" dreist, ha ne zablante ket Kanga kompren petra a dalveze.

"Eur gibelladenn da genta," a lavaras Kanga gand eur vouez laouen.

"Aha!", a lavaras Porhellig adarre, en eur zelled nehet en-dro dezañ evid klask ar re all. Med ar re all ne oant ket aze. Konikl a oa o c'hoari gand Babig Rou en e di dezañ e-unan, hag e kare anezañ muih-mui beb munutenn, ha Pou, e-noa divizet beza eur Hanga, a oa c'hoaz war an dorgenn drêz er Hoad, oh egzersi ober lammou.



"N'on ket sur tamm ebed," a lavaras Kanga, prederiet, "ne vefe ket eur menoz mad kaoud eur gibelladenn yén fenoz. Plijoud a rafe dit, Rou karet?"

Porhellig, n'e-noa ket plijet dezañ biskoaz ar hibelladennoù, a gridiennas gand eur gridienn leun a imor, hag a lavaras kén kaloneg ha ma helle:

"Kanga, gweled a ran ez eo deut ar houlz da gomz sklêr."

"Rou bihan fentuz," a lavaras Kanga, en eur ober war-dro dour ar gibelladenn.

"N'eo ket me Rou," a lavaras Porhellig kreñv. "Porhellig an hini eo ez on!"


"Ya, va loulig, ya," a lavaras Kanga, gand eur vouez sioullaad. "Hag e treveze mouez Porhellig ivez! Pegen



akuit eo eñ," a lavaras c'hoaz, en eur gemer eun tamm soavon melen braz-tre e-barz ar ganastell. "Petra a raio bremañ?"

"Ne welez ket?" a huchas Porhellig. "'Peus ket daou-lagad? Sell ouzin!"

"Emaon o selled, Rou karet," a lavaras Kanga, rust a-walh. "Ha gouzoud a rez ar pez am-oa lavaret dit deh diwar-benn ober ardou. Ma talvez d'ober ardou evel Porhellig, pa vi braz e vi heñvel ouz Porhellig... ha soñj pegen mantret e vi. Bremañ neuze, e-barz ar gibelladenn, hag arabad ma vefe red din komz c'hoaz ouzit diwar-benn an dra-ze."



A-raog dezañ gouzoud peleh e oa, Porhellig a oa en dour, ha Kanga a oa o pura anezañ da vad gand eur zerviedenn leun a eon.



"Ayout!" a huche Porhellig. "Leusk ahanon da vond er-mêz! Porhellig an hini eo ez on!"

"Na zigor ket da henou, loulig, pe ez aio ar zoavon e-barz," a lavaras Kanga. "Setu! Petra am-oa lavaret dit?"

"Te ... te ... te 'peus greet a-fetepañs," a valbouzas Porhellig, a-benn ma hellas komz adarre... ha neuze dre wall-zarvoud e tapas eur genaouad all a eon.

"Mad eo, loulig, na lavarez tra," a lavaras Kanga, hag eur vunutenn war-lerh e oa Porhellig er-mêz euz an dour, hag e oe frotet gand eur zerviedenn beteg ma oe seh.

"Bremañ," a lavaras Kanga, "da louzou, ha neuze, da gousked."

"Pe ... pe ... peseurt louzou?" a lavaras Porhellig.

"Evid ma vi braz ha kreñv, loulig. 'Peus ket c'hoant beza bihan ha gwan evel Porhellig, 'peus ket? Mad, neuze!"



D'ar poent-se e skoas unan bennag ouz an nor.

"Deus-tre," a lavaras Kanga, hag e teuas Kristofer Robin e-barz.

"Kristofer Robin, Kristofer Robin!" a huchas Porhellig. "Lavar da Ganka piou on. Derhel a ra-hi da lavared ez on Rou. N'on ket Rou, neketa?"

Selled a reas Kristofer Robin outañ gand evez, hag e lavaras "nann" gand e benn.

"N'hallez ket beza Rou," emezañ, "peogwir emeon just o paouez gweled Rou o c'hoari e-barz ti Konikl."

"Ma!" a lavaras Kanga. "Souezuz eo memestra! Souezuz eo em-ije greet eur seurt fazi."

"Setu!" a lavaras Porhellig. "Lavaret am-oa dit. Porhellig ez on."

Kristofer Robin a lavaras "nann" c'hoaz gand e benn.

"O, n'out ket Porhellig," emezañ. "Anavezoud a ran mad Porhellig; hag e liou a zo disheñvel penn-da-benn."

Kregi a reas Porhellig da lavared e oa evel-se p'en-oa bet eur gibelladenn, ha neuze e soñjas ne lavarfe ket marteze an dra-ze, ha pa oa o tigeri e henou evid lavared eun dra bennag all, e lakaas Kanga al loaiad louzou e-barz, hag e skoas dousig war e gein en eur lavared dezañ ne oa ket displijuz tamm ebed ar blaz pa vezed boaz outañ.

"Gouzoud a ouien ne oa ket Porhellig," a lavaras Kanga. "En em houlen a ran piou e hell beza."

"Marteze ez eo kar da Bou," a lavaras Kristofer Robin.

"Marteze eun niz pe eun eontr, pe eun dra bennag evel-se?"

Lavared a reas Kanga e oa sur a-walh an dra-ze, hag e lavaras e vefe red rei eun ano bennag dezañ.

"Ober a rin Poutel anezañ," a lavaras Kristofer Robin. "Herri Poutel, e berr."

"Ha just pa oa divizet, e risklas Herri Poutel er-mêz euz divreh Kanga hag e lammas d'an traoñ. Evid e vrasa levenez, e oa chomet digor an nor war-lerh Kristofer Robin. Biskoaz n'e-noa redet Herri Poutel Porhellig kén buan ha ma reas neuze, ha ne baouezas ket da redeg kén na oa erruet tost-tre d'e di. Med pa oa kant metrad euz e di e paouezas da redeg, hag ez eas a-ruill beteg e di, evid kavoud en-dro e liou kén brao ha kén plijuz..."



Neuze e chomas Kanga ha Rou e-barz ar Hoad. Ha beb meurz e tremene Rou e zevez gand e vignon braz Konikl, ha beb meurz e tremene Kanga he devez gand he mignon braz Pou, o teski dezañ da lammad, ha beb meurz e tremene Porhellig e zevez gand e vignon braz Kristofer Robin. Evel-se e oant oll laouen adarre.

## Pennad eiz

### Ennañ e sav Kristofer Robin eun Avoñtur Vraz beteg penn-ahel an Hanternoz

Eun devez e oa eet Pou en eur jilgammad beteg uhella torgenn ar Hoad da weled hag-eñ e oa dedennet e vignon Kristofer Robin gand Arzed. E-pad e zijuni diouz ar beureze (eur préd simpl gand eun nebeud kaotigell ledet war eur wastell-vél pe ziou), e-noa soñjet a-daol-trumm en eur ganaouen nevez. Kregi a ree evel-henn:

*"Kan O! da vuhez eun Arz."*

Pa oa eet kén pell hag an dra-ze, e skrapas e benn en eur zoñjal, "Eun derou mad eo evid eur ganaouenn, med petra ober evid an eil gwerzenn?" Klask a reas da gana "O" diou pe deir gwech, med en aner. "Marteze e vefe gwel-loh," a zoñjas, "ma kanfen Hi da vuhez eun Arz." Neuze e kanas evel-se... med en aner. "Mad-tre, neuze" emezañ, "diou wech e kanin ar werzenn genta, ha marteze ma kanan anezi buan-tre, en em gavin o kana an drede hag ar bederved gwerzenn a-raog m'am-mo amzer da zoñjal enno, hag e vo eur Ganaouenn vad. Bremañ neuze:



"Kan O! da vuhez eun Arz!  
Kan O! da vuhez eun Arz!  
Ne vern pe e ra glao pe erh,  
Pa 'm-eus bet kalz a vél war va min!  
Ne vern pe e ra erh pe reo,  
Pa 'm-eus bet kalz a vél war va faoiou brao ha prop!  
Kan O! d'eun Arz!  
Kan O! da Bou!  
Hag eun draig bennag am-mo a-benn eun eur pe ziou.

Ken e plije dezañ ar ganaouenn-ze ma kanas anezi a-héd an hent penn-da-benn beteg penn uhella ar Hoad, "ha ma kanan anezi pelloh," a zoñje, "e teuio eur an adverenn, ha neuze ar werzenn ziweza ne vo ket gwir kén." Neuze en em lakaas da vuskana e leh kana anezi.

Edo Kristofer Robin azezet war dreuzou e zor, o lakaad e Heuzou Braz. Kerkent ha ma welas an Heuzou Braz, e ouias Pou e oa eun Abadenn a oa da hoarvezoud, hag e tilamas ar mél euz bég e fri gand kil e bao, hag en em lakaas kén cheuh ha ma hellas, evid en em ziskouez Prest evid ober N'eus forz petra.

"Salud, Kristofer Robin," a youhas.

"Salud, Arz Pou. N'on ket evid lakaad an heuz-mañ."

"Fall eo," a lavaras Pou.

Daoust hag-eñ e soñj dit ne hellfez ket en em harpa jentil ouzin, peogwir e kouezan war greiz va hein kén kreñv ma sachan."

Azeza a reas Pou, sank a reas e dreid en douar, hag e vountas kreñv ouz kein Kristofer Robin, ha Kristofer Robin a vountas kreñv outañ, hag e sachas hag e sachas war e heuz kén m'e-noa lakeet anezañ.



"Setu," a lavaras Pou. "Petra emaom o vond d'ober bremañ?"

"Eun Avañtur vraz emaom o vond da gaoud," a lavaras Kristofer Robin, en eur zével hag oh en em vrousta... "Trugarez, Pou."

"Eun Avoñtur Vraz?" a lavaras Pou, friant. "Ne gav ket din em-ije greet unan biskoaz. Da beleh emaom o vond gand an Avoñtur Vraz-se?"

"Avañtur, paour-kêz Arz sod. 'Añ' an hini eo."

"O!", a lavaras Pou. "Me oar." Ne ree ket avad.

"Emaom o vond da zizolei Penn-Ahel an Hanternoz."

"O!" a lavaras Pou adarre. "Petra eo Penn-Ahel an Hanternoz?" a houlennas.

"Netra nemed eun dra a zizoloer," a lavaras Kristofer Robin dievez, heb beza sur-tre e-unan.

"O! gweled a ran," a lavaras Pou. "Gouest eo an Arzed da zizoloi anezañ?"

"Evel just int gouest. Ha Konikl ha Kanga an oll re ahanoh. Eun Avañtur Vraz an hini eo. Setu ar pezh a dalv Avañtur Vraz. An oll re ahanom heul da heul. Gwelloh e vefe dit lavared d'ar re all beza prest, tra ma sellan ha mad eo ma fuzuill. Ha Pourveziou a dleom digas ganeom."

"Digas petra?"

"Traou da zebri."

"O! a lavaras Pou, laouen. "Me zoñje din az-poa lavaret Pourveziou. Me 'zo o vond da lavared dezo." Hag ez eas kuit en eur jilgammad.

An hini kenta en em gavas gantañ a oa Konikl.

"Salud, Konikl," emezañ, te an hini eo?"

"Lavar n'on ket," a lavaras Konikl, "hag e weli petra a hoarvezo."

"Eur gefridi am-eus evidout."


"Ober a rin anezi dezañ."

"Emaom toud o vond d'eun Avoñtur Vraz gand Kristofer Robin."

"Penaos ez aim?"

"Gand eun doare bag, me gav din," a lavaras Pou.

"O! an doare-ze."



"Ya. Ha ni 'zo o vond da zizolei eur Penn-Ahel pe eun dra bennag heñvel. Pe eur Penn-Gozed? N'eus forz penaos emaom o vond da zizolei anezañ."

"Gwir eo," a lavaras Konikl.

"Ya. Ha ni 'zo o vond da gas Pour-traou da zebri ganeom. Kenkaz m'on-ije c'hoant da zebri anezo. Bremañ emaom o vond da weled Porhellig. Lavar da Ganka, neketa?"

Lezel a reas Konikl hag e redas buan da di Porhellig. Edo Porhellig en e goazez war an douar e toull dor e di, o c'hweza laouen war eur hwervizonenn, hag oh en houlenn petra a hoarvezfe er bloaz-mañ, ar bloaz da zond, eur wech bennag, pe biken. Dizoloet e-noa just ne vefe biken, hag eñ o klask kaoud soñj petra oa, spi gantañ war eun dro ne oa ket eun dra vad, pa zeuas Pou.



"O! Porhellig," a lavaras Pou enervet, "emaom o vond d'eun Avoñtur, an oll ahanom, gand traou da zebri. Da zizolei eun dra bennag."

"Da zizolei petra?" a lavaras Porhellig, nehet.

"O! eun dra hepken."

"Netra gouez."

"N'e-neus lavaret netra Kristofer Robin diwar-benn gouezoni. Lavaret e-neus just e-noa eun "añ".

"N'eo ket rag o gouzougou am-eus aon," a lavaras Porhellig siriuz. O dent an hini eo. Med ma teu Kristofer Robin ganeom, n'em-mo aon rag netra."

Goude eur pennadig amzer e oant prest oll e penn uhella ar Hoad, hag e komañsas an Avañtur. Da genta e teu Kristofer Robin ha Konikl, neuze Porhellig ha Pou; neuze Kanga gand Rou en he godell, ha Kaouenn; neuze Iañ; ha, er penn all, en eul linennad hir, oll vignoned ha kerent Konikl.

"N'am-oa kouviet anezo," a zisklerias Konikl dievez. "Deuet int, ha setu. Dond a reont atao. Bez' e hellint bale er fin, goude Iañ."

"D'am zoñj," eme Iañ, nehuz eo. N'am-oa ket c'hoant da vond d'an Avoñ... evel m'e-neus lavaret Pou. Deuet on evid ober plijadur nemetken. Med setu-me; ha ma'z on fin an Avoñ-ar pez e oam o komz diwar e benn... neuze lezit ahanon beza ar fin. Med, ma vez red din rei eun taol skubell d'eun hanter dousenn euz mignoned-kerent vihan Konikl da genta beb gwech m'am-eus c'hoant azeza evid ober eun diskuiz bihan, neuze an dra-ze n'eo ket eun Avoñ... n'eus forz petra eo... tamm ebed, med eun Trouz Dispiz. Setu ar pez a zoñjan."

"Gweled a ran ar pez a fell da Iañ lavared," a lavaras Kaouenn. "D'am zoñj...".

"Ne houlennan e zoñj gand hini ebed," eme Iañ. Me a lavar just ar pez a zoñjan. Bez' e hellom klask Penn-Ahel an Hanternoz, pe dañsal "Plahig an douar-nevez, foei foei va zammig aotrou" pe "Ar yarig, ar yarig, peleh ema he vi". Ingal eo din."

Dond a reas eur youhadenn euz penn kenta al linennad.

"Deuit!" a huchas Kristofer Robin.

"Deuit!" a huchas Pou ha Porhellig.

"Deuit!" a huchas Kaouenn.

"Emaom o vond war-raog," a lavaras Konikl. "Red eo din kuitaad ahanoh." Hag ez eas buan da benn an Avoñtur Vraz gand Kristofer Robin.

"Mad-tre," eme Iañ. "Emaom o vond war-raog. Arabad tamall ahanon avad."



Neuze an oll anezo a yeas war-raog evid dizolei Penn-Ahel an Hanternoz. Ha dre ma kerzent, e kontent kaoz an eil re gand ar re all diwar-benn tra-pe-dra, an oll anezo nemed Pou, a oa o sevel eur ganaouenn.

"Sed amañ ar houblad kenta," emezañ da Borhellig, pa oa echu gantañ.

"Kenta koublad petra?"

"Va hanaouenn."

"Peseurt kanaouenn?"

"Homañ."

"Peseurt hini?"

"Ma, ma selaouez, Porhellig, e klevi anezi."

"Penaoz e ouzout ne zelaouan ket?"

Ne oa ket Pou evid respont d'an dra-ze, neuze e komañsas da gana.

Mond a reent oll da zizolei ar Penn-Ahel, Kaouenn ha Porhellig ha Konikl hag all; Eun dra a zo da zizolei an hini eo o-deus lavaret din Kaouenn ha Porhellig ha Konikl hag all.



Iañ, Kristofer Robin ha Pou  
 Ha kerent Konikl a zeue an oll anezo ive ...  
 Ha peleh e oa ar Penn-Ahel, hini ebed anezo ne ouie...  
 Kanit Hey! evid Kaouenn ha Konikl hag an oll re!

"Peoh!" a lavaras Kristofer Robin, o trei daved Pou,  
 "Tostaad a reom ouz eul leh dañjeruz."

"Peoh!" a lavaras Pou, o trei buan daved Porhellig.

"Peoh!" a lavaras Kanga da Gaouenn, tra ma lavare  
 Rou "Peoh!" dezañ e-unan meur a wech, sioul-kenañ.

"Peoh!" a lavaras Kaouenn da Iañ.

"Peoh!" a lavaras Iañ gand eur vouez terrubl da oll  
 vignoned-kerent Konikl, hag ind-i da lavared "Peoh!" buan  
 an eil d'egile beteg fin al linennad, beteg an hini diweza.  
 Kén strafuillet e oe an diweza hag ar bihanna mignon-  
 ha-kar o soñjal e oa oll dud an Avoñtur o lavared "Peoh!"  
 dezañ, ma 'n em douaras e-unan, e benn en traoñ, en eur  
 fraill, hag e chomas aze e-pad daou zevez kén na oa dañjer  
 ebed kén, ha neuze ez eas d'ar gêr buan-ha-buan, hag e  
 vevas sioul gand e Voereb da viken. Aleksandr C'hwil a oa  
 e ano.

Erruet e oant e-kichenn eur stèr a en em wee hag a  
 bennbouëllenne etre riblou uhel rohellig, hag e welas  
 dioustu Kristofer Robin pegen dañjeruz e oa.



"Al leh dres an hini eo," a zisklerias, "evid eun Daga-  
 denn."

"Peseurt abadenn?" a vouskomzas Pou da Borhellig.  
 "Eun abadenn?"

"Paour-kêz Pou," a lavaras Kaouenn, lorch ennañ, n'ou-  
 zout ket petra eo eun dagadenn?"

"Kaouenn," a lavaras Porhellig, o selled outañ rust,  
 "mouskomz Pou a oa eur vouskomz prevez-tre, ha ne oa  
 ezomm ebed..."

"Eun dagadenn," a lavaras Kaouenn, "a zo eun doare  
 Souezadenn."



"Eun abadenn a-wechou ive," a lavaras Pou.

"Eun dagadenn, evel ma oan o tiskleria da Bou," a  
 lavaras Porhellig, "a zo eun doare Souezadenn."

"Ma lamm tud warnout a-daol-trumm, ez eo eun Daga-  
 denn," a lavaras Kaouenn.

Pou, a ouie bremañ petra oa eun Dagadenn, a lavaras e  
 oa erru eun abadenn zouezuz gantañ eun deiz: eur vodenn

lann a oa savet outañ a-daol-trumm eun deiz pa oa o koueza euz eur wezenn, hag e-noa lakeet c'hweh devez leun evid tenna kuit an oll drein a oa sanket e-barz e grohenn.

"N'emaom ket o komz diwar-benn bodennou-lann," a lavaras Kaouenn, droug enni eun tammig.

"Me zo," a lavaras Pou.

Edont bremañ o skrimpad gand evez a-héd ar stèr, o vond euz eur roh d'eben, ha goude beza greet eun tamm hent e tegouezjont en eul leh ma oa ledannoh ar riblou euz an daou du, ha diouz pep kostez an dour, e oa eun tamm douar geot leh ma hellent azeza ha diskuiza. Kerkent ha ma welas an dra-ze, e huchas Kristofer Robin "Chomit a-zav!", hag eh azezas hag e tiskuizas an oll re anezo.

"Me zoñj," a lavaras Kristofer Robin, "e tlefem debri on oll bourveziou bremañ, evid n'on-ije ket kemend a draou da gas ganeom."


"Debri or petra?" a lavaras Pou.

"Toud an traou on-eus digaset ganeom," a lavaras Porhellig, en eur gregi da zebri.

"Eur menoz mad eo," a lavaras Pou, hag e krogas da zebri ive.

"Pep hini e-neus bet eun tamm?" a houlennas Kristofer Robin, leun e henou.

"An oll nemedon," eme Iañ. "Evel boaz." Selled a reas outo gand e zoare trist. "N'eus hini ebed ahanoh a vefe azezet war eun askolenn, dre chañs?"



"Me zoñj din ez on," a lavaras Pou. "Ayout!" Sevel a reas hag e sellas a-dreñv dezañ. "Ya, e oan. Me gave din."

"Trugarez, Pou. Ma n'az-peus ket ezomm anezi kén." Mond a reas beteg plas Pou, hag e krogas da zebri.

"Ne ra ket vad dezo, gouzoud a rez, azeza warno," a lavaras c'hoaz, tra ma selle en neh en eur chaokad. "Tenna a ra kuit peb buhez anezo. Dalhit soñj euz an dra-ze, evid eur wech all, an oll ahanoh. Eun tamm doujañs, soñjal eun tamm bihan d'ar re all, ze ra eun diforh braz."

A-benn ma oa echu e bréd gand Kristofer Robin, e vouskomzas da Gonikl, ha Konikl a lavaras: "Ya, ya, evel just," hag ind-i o-daou da vale assemblez eun tammig a-héd ar stèr.

"N'am-eus ket c'hoant e vefe klevet gand ar re all," a lavaras Kristofer Robin.

"Evel just," a lavaras Konikl, oh ober e aotrou.

"Ze zo ... en em houlenn a ran ... ze zo nemed ... Konikl, me gav din ne ouzout ket. Penaoz ema Penn-Ahel an Hanternoz?"

"Ma," a lavaras Konikl, en eur floura e vourennou, "Sed aze eur goulenn."

"Gouezet em-oa, med em-eus dizoñjet tost-da-vad," a lavaras Kristofer Robin dievez.

"Iskiz eo," a lavaras Konikl, med dizoñjet em-eus tost-da-vad me ive, daoust m'am-oa gouezet mad."

"Me gav din ez eo nemed eun ahel sanket en douar?"

"Sur ez eo eun ahel," a lavaras Konikl, "peogwir e reer ahel anezañ, ha mar deo eun ahel, ma, e soñjfen ez eo sanket en douar, neketa, peogwir ne vefe leh all ebed evid sank azezañ."

"Ya, setu ar pez a zoñjen."

"An dra nemetañ," a lavaras Konikl, "eo gouzoud peleh ema sanket?"

"Setu ar pez a glaskom," a lavaras Kristofer Robin.

Mond a rejont en-dro daved ar re all. Porhellig a oa astennet war e gein, o kousked e peoh. Edo Rou o walhi e zremm hag e baoiou er stèr, tra ma tisklerie Kanga da bep hini, lorch enni, e oa ar wech kenta dezañ da walhi e zremm

e-unan-penn, hag e oa Kaouenn o konta da Ganka eur Zorbienn interesant leun a heriou hir evel Añsiklopediez ha Rododiñdroñ, na zelaoue ket Kanga.

"N'on ket a-du evid en em walhi kement-se," a hrozmole Iañ. "Ar zotoni vodern-ze Gwalhi a-dreñv-an-diskouarn. Petra a zoñjez, Pou?"

"Ma," a lavaras Pou, "Me zoñj..."



Med ñe ouezim biken ar pez a zoñje Pou, pa oe klevet Rou o wihal a-daol-trumm, trouz unan bennag o koueza a-flao e-barz an dour, hag eur youhadenn kreñv a-berz Kanga o houlen sikour.

"Kemend a draou evid en em walhi," eme Iañ.

"Kouezet eo Rou e-barz an dour!" a huchas Konikl, hag eñ ha Kristofer Robin da vond diwar-herr evid sikour anezañ.

"Sellit ouzin o neu!" a wihe Rou euz kreiz e boull-dour, hag e oe kaset buan-ha-buan d'eur poull all dre eul lammdour.


"Mad an traou ganit, Rou, Loulig?" a huche Kanga, nehet-braz.

"Ya!" eme Rou. "Sell ouzin o neu...", ha dre eul lamm-dour all ez eas e-barz eur poull-dour all.

Pep hini anezo a glaske ober eun dra bennag evid sikour. Porhellig, dihunet-mad a-daol-trumm, a lamme-dilamme en eur lavared "Hou, terrubl eo"; Kaouenn a oa o tiskleria e oa derhel e benn a-uz d'an dour an dra bouezuz da ober pa hoarveze eur zoubadenn drumm; edo Kanga o lammad a-héd ar ribl, en eur lavared "sur out ez eo mad ganit, Rou karet ?, hag e responte Rou, euz ar poull-dour leh ma oa e-barz d'ar poent-se "Sell ouzin o neu!" Iañ e-noa troet e gein diouz tu ar poull hag e-noa lakeet e lost a-istribill a-uz ar poull-dour kenta ma oa kouezet Rou e-barz, ha gand e gein troet war-zu ar gwall-zarvoud e hrozmole sioul dezañ e-unan, en eur lavared: "Kement evid en em walhi; med tap 'ta va lost, Rou bihan, hag ez aio mad pep tra evidout"; ha Kristofer Robin ha Konikl a zeuas en eur redeg buan pelloh eged Iañ, hag a halvas ar re all dirazo.

"Mad-tre, Rou, emeon o tond," a huchas Kristofer Robin.

"Lakait eun dra bennag a-dreuz ar stèr izelloh, kama-raded," a huchas Konikl.



Med Pou a oa o lakaad eun dra bennag. Daou boull-dour pelloh e oa gand eun ahel-karr en e baoiou, ha Kanga a zeuas da gemer ar penn all anezañ, hag etrezo e talhjont anezañ a-dreuz izella plas ar poull-dour; ha Rou, en eur vourbouillad bepred, lorch ennañ, "Sellit ouzin o neu" a yeas gand réd an dour beteg ennañ, hag a skrimpas ermêz.





"Gwelet 'peus ahanon o neui?" a wihas Rou, enervet, tra ma oa Kanga o hourdrouz anezañ hag o frota anezañ. "Pou, gwelet 'peus ahanon o neui? Neui eo an ano, ar pez e oan oh ober. Konikl, 'peus ket gwelet ar pez e oan oh ober? Neui. He!, Porhellig! He! Porhellig! Petra a gav dit e oan oh ober? Neui! Kristofer Robin, gwelet 'peus ahanon..."

Med ne oa ket Kristofer Robin o selaou. O selled ouz Pou e oa.

"Pou," emezañ, 'peleh 'peus kavet an ahel-ze?"  
Selled a ree Pou ouz an ahel a oa en e zaouarn.

"Kavet 'm-eus anezañ, ha netra ken," emezañ. "Me gave din e hellfe beza talvouduz. Kemeret 'm-eus anezañ, ha netra ken."

"Pou," a lavaras Kristofer Robin war an ton braz, "Echu eo an Avañtur Vraz. Kavet az-peus Penn-Ahel an Hanternoz!"

"O!" a lavaras Pou.

Azetet e oa Iañ, e lost e-barz an dour, pa zeuas an oll re all en-dro davetañ.

"Ra lavaro unan bennag da Rou d'ober buan," emezañ. Yennoh-yenna e teu va lost da veza. N'am-eus ket c'hoant d'hel lavared, med hel lavared a ran memestra. N'am-eus ket c'hoant klemm, med evel-se 'ma. Yen eo va lost."

"Setu-me!" a wihas Rou.

"O! setu-te."

"Gwelet 'peus ahanon o neui?"

Sacha a reas Iañ e lost er-mêz euz an dour, hag e lakee anezañ da fistoulad euz an eil tu d'egile.

"Evel ma soñje din," emezañ, "Kollet pep kizidigez. Kropet eo. Setu ar pez a zo erruet. Ma, gand ma ne vo jenet dén gand an dra-ze, e soñj din ez eo mad."

"Paour-kêz Iañ! Seha a rin anezañ evidout," a lavaras Kristofer Robin, hag e kemeras e vouchouer ha da frota e lost.

"Trugarez, Kristofer Robin. N'eus nemedout a zeblant kompren kudennou al lostou. Ne zoñjont ket ... setu ar gudenn gand reou 'zo euz ar re all. N'o-deus tamm faltazi ebed. Eul lost n'eo ket eul lost evito, n'eo nemed eun Draig Ouspenn ouz ar penn-a-dreñv."

"Ne vern, Iañ," a lavaras Kristofer Robin, en eur frota ar hreñva posubl. "Gwelloh e ya an traou?"

"Santoud a ran anezañ muioh evel eul lost marteze. Din-me eo adarre, ma komprenez ar pez a lavaran."

"Salud, Iañ," a lavaras Pou, en eur zond daveto gand e ahel.

"Salud, Pou. Trugarez evid ar goulenn, med e hellin implijoud anezañ a-nevez a-benn eun devez pe zaou.

"Implijoud petra?" a lavaras Pou.

"Ar pez emañ o komz diwar e benn."

"Ne oan ket o komz diwar-benn tra-pe-dra," a lavaras Pou, touteg.

"Dre va faot c'hoaz. Me gave din e oas o lavared pegen nehet e oas diwar-benn va lost, a oa deut kropet-toud, ha daoust ha ne hellfez ket ober eun dra bennag evid sikour ahanon?"

"Nann," a lavaras Pou. "Ne oa ket me," emezañ. Soñjal a reas e-pad eur pennadig amzer, hag e roas eun ali evid sikour: "Marteze e oa unan all bennag."

"Ma, lavar mersi dezañ pa weli anezañ."

Nebet, e sellas Pou ouz Kristofer Robin.

"Pou e-neus kavet Penn-Ahel an Hanternoz," a lavaras Kristofer Robin. "Deuz ar henta eo, neketa?"

Stoui a reas Pou e benn, uvel.

"Gwir eo?" eme Iañ.

"Ya," a lavaras Kristofer Robin.

"Daoust hag-eñ ez eo an dra-ze e oam o klask?"

"Ya," a lavaras Pou.

"O!" eme Iañ. "Ma, memestra ... n'e-neus ket greet glao," emezañ.



Sanka a rejont an Ahel e-barz an douar, ha Kristofer Robin a stagas eur skritell warnañ:

Penn-Ahel an HanterNoz

DiZoloeT gand

PoU

PoU a GaVAs anezañ

Hag ind-i d'ar gêr adarre. Hag e kav din, med n'on ket sur, e oe roet eur gibelladenn domm da Rou, hag e oe kaset war-eeun d'e wele. Pou, avad, a yeas en-dro d'e di e-unan, lorch ennañ gand ar pezh e-noa greet, hag e tebras eun tamm bihan evid rei nerz en-dro dezañ.

## Pennad nao

### Ennañ ez eo gronnet Porhellig penn-da-benn gand an dour

Glao a ree ha glao a ree ha glao a ree. Porhellig en em lavaras dezañ e-unan n'e-noa biskoaz gwelet kemend a hlao en e vuhez, hag eñ koz-Noe dija ... tri, pe pevar bloaz? Devezioù ha devezioù ha devezioù.

"Ma vijen bet da vihanna," a zoñjas-eñ, tra ma selle er-mêz dre ar prenestr, "ma vijen bet e ti Pou, pe e ti Kristofer Robin, pe e ti Konikl pa gomañsas d'ober glao, neuze am-bije bet Kompagnunez e-pad an oll amzer-ze, e-leh beza amañ va-unan-penn, gand netra d'ober nemed en em houlenñ pegoulz e paouezo." Hag eh ijinas e oa gand Pou, o lavared, "Gwelet 'peus kemend a hlao dija, Pou?" ha Pou o lavared, "Spontuz eo, neketa, Porhellig?", ha Porhellig o lavared: "En em houlenñ a ran penaoz emma kont gand Kristofer Robin," ha Pou o lavared, "Me gav din eo gronnet tost-da-vad ar paour-kêz Konikl gand dour-beuz d'ar houlz-mañ." Plijuz e vefe bet komz evel-se, hag e gwirionez, ez eo didalvoud tost-da-vad en em gavoud gand eun dra kement a startijenn ennañ ha dour-beuz, ma n'eus den ebed evid ranna anezañ ganeoh.

Dreist, sur, e oa an traou. Deuet e oa da veza gwaziu ar fezier bihan seh leh m'e-noa furchet ken aliëz Porhellig gand e fri, ar gwaziu bihan e-noa strinket dour a-dreuz dezo a oa deuet da veza stèriou, hag ar stèr, o-doa c'hoariet ken laouen etre he riblou, a oa deuet er-mêz euz he gwele hag a gemere kemend a blas, m'en em houlenne Porhellig hag-eñ e teufe-hi bremaig e-barz e wele dezañ.



"Ankeniuz tamm-pe-damm eo," a lavaras dezañ e-unan, "beza eul Loen Bihan-tre gronnet penn-da-benn gand Dour. Kristofer Robin ha Pou a hellfe tehed o krapad gwéz, ha Kanga a hellfe tehed o lammad, ha Konikl a hellfe tehed o toulla eun hent dindan an douar, ha Kaouenn a hellfe tehed o nijal, hag lañ a hellfe tehed o ... oh ober eun trouz braz beteg ma vefe salvet, ha setu-me, gronnet gand dour ha n'hallan ober mann ebed."

Derhel a ree d'ober glao, ha bemdez e save an dour eun tammig uheloh, bremañ e oa tost ouz prenest Porhellig... ha n'e-noa greet netra evid c'hoaz.

"Setu aze Pou," a zoñjas ennañ e-unan. "Pou n'eo ket braz e benn, med morse ne hoarvez droug ebed gantañ. Ober a ra traou droch, hag e troont da veza mad. Setu aze Kaouenn. Kaouenn n'he-deus tamm penn ebed tost-davad, med e oar traou. Hi a ouezfe petra a vefe ar gwella da ober pa vefe gronnet gand dour. Setu aze Konikl. N'e-neus ket desket e-barz leoriou, med e hell bepred soñjal en eur raktres akuit. Setu aze Kanga. N'eo ket ampart, n'eo ket sur, med e vefe ken ankeniet diwar-benn Rou ma rafe eun dra vad bennag hep soñjal. Ha neuze setu aze Iañ. Ken trist eo n'eus forz penaoz ma ne rafe forz diwar-benn an dra-ze. Med en em houlenñ a ran petra a rafe Kristofer Robin?"

Neuze a-daol-trumm e teuas soñj dezañ euz eun istor e-noa Kristofer Robin kontet dezañ diwar-benn eun dén a oa war eun enezenn digenvez e-noa skrivet eun dra bennag war eun tamm paper ha lakeet anezañ en eur voutaill ha stlapet anezi e-barz ar mor; ha Porhellig a zoñjas ma skrivfe eun dra bennag war eun tamm paper ha ma lakfe anezañ en eur voutaill ha ma stlapfe anezi e-barz ar mor, e teufe marteze unan bennag da zavetei anezañ!

Kuitaad a reas ar prenest hag en em lakaas da furchal en e di, leh na oa ket dindan dour, hag a-benn ar fin e kavas eur hreion hag eun tamm bihan a baper seh, hag eur voutaill gand eur stouv warni. Hag e skrivas war eun tu euz ar paper:

SIKOUR!  
PORHIG (ME)

ha war an tu all:

ME EO PORHIG, SIKOUR SIKOUR!

Neuze e lakaas an tamm paper e-barz ar voutaill, hag e stouvas ar voutaill ken stard ha ma hellas, hag en em stouas er-mêz euz ar prenestr ken pell ha ma hellas heb koueza en dour, hag e stlapas ar voutaill ken pell ha ma

helle stlepel — plouf! — hag eur pennadig goude e teuas en-dro war horre an dour; hag e sellas outi war-neuñv o vond kuit goustadig er pellder, beteg m'e-noa droug en e zaoulagad, ha gwechou 'zo e soñje dezañ e oa ar voutaill, ha gwechou 'zo e soñje dezañ ne oa nemed eur rizenn war an dour e oa oh heulia, ha neuze e ouias a-daol-trumm ne welfe ket ken anezi en-dro, hag e-noa greet pep tra a helle ober evid en em zavetei.



"Neuze bremañ," a zoñjas-eñ, "red e vo da unan bennag all ober eun dra bennag, ha spi am-eus e vo greet bremaig, rag ma ne vez ket greet e vo red din neui, ar pez n'hallan ket ober, neuze em-eus spi e vo greet bremaig." Ha neuze e laoskas eun hir a huanadenn hag e lavaras, "Keuz am-eus pa n'ema ket Pou amañ. Kalz plijusoh eo beza daou."

\*\*\*

Pa gomañsas ar glao e oa Pou o kousked. Glao a ree, hag e ree glao, hag e ree glao, hag e kouske, hag e kouske, hag e kouske. Eun devez skuizuz e-noa bet. Soñj ho-peus penaoz e-noa dizoloet Penn-Ahel an Hanternoz; ma, kemend a lorh a oa ennañ gand an dra-ze ma houlenas digand Kristofer Robin hag-eñ e oa Pennou-Ahel all euz ar seurt ma hellfe eun Arz, bihan e benn, dizolei anezo.

"Bez' ez eus eur Penn-Ahel euz ar Hreisteiz," a lavaras Kristofer Robin, "hag e soñj din ez eus eur Penn-Ahel euz ar Reter hag eur Penn-Ahel euz ar Hornog, daoust ma ne

blij ket d'an dud komz diwar o fenn."

Enervet braz e oa Pou pa glevas an dra-ze, hag e lavaras e hellfent ober eun Avoñtur evid dizolei Penn-Ahel ar Reter, med Kristofer Robin e-noa soñjet ober eun dra gand Kanga; neuze ez eas Pou war-raog evid dizolei Penn-Ahel ar Reter drezañ e-unan. Daoust hag-eñ e tizoloas anezañ pe ne reas ket, dizoñjet am-eus; med ken skuiz e oa pa zeuas en-dro d'ar gêr ma kouezas buan kousket en e gador, e-kreiz e goan, goude m'e-noa debret e-pad eun tammig ouspenn eun hanter-eurvez, hag e kouskas, hag e kouskas hag e kouskas.



Neuze a-daol-trumm e oa oh huñvreal. Edo e Penn-Ahel ar Reter, hag e oa eur penn-ahel yén-kenañ goloet penn-da-benn gand ar seurt yenna erh ha skorn. Kavet e-noa eur ruskenn wenan evid kousked e-barz, med ne oa ket plas a-walh evid e ziouharr, neuze e-noa laosket anezo er-mêz. Ha Minarded ouez, euz ar seurt a zo o chom e Penn-Ahel ar Reter, a zeuas hag a grignas toud ar foulinenn euz e ziouharr evid ober neiziou evid o re vihan. Hag ar muia e krignent, ar yenna e teue e ziouharr da veza, beteg ma tihunas a-daol-trumm en eur lavared Ayou! ... hag edo aze en e goazez en e gador gand e dreid en dour, ha dour penn-da-benn en-dro dezañ!

Lakaad a reas an dour da strinka en eur vond beteg e zor, hag e sellas er-mêz...

"Siriuz eo an afer," a lavaras Pou. "Red eo din tehed."

Neuze e kemeras e vrasa podad mél hag e tehas kuit gantañ beteg eur skourr ledan euz e wezenn, uhel a-uz an dour, ha neuze e tiskennas en-dro hag e tehas gand eur podad all... ha pa oe echu penn-da-benn tehed gantañ, setu aze Pou war e skourr, e ziouharr a-istribill, hag aze, en e gichenn, e oa dég podad mél...

Daou zevez war-lerh, e oa Pou aze, azezet war e skourr, e ziouharr a-istribill, hag aze en e gichenn, e oa eur podad mél. Pevar devez war-lerh, aze e oa Pou...

Hag e oa diouz beure ar pevare devez ma teuas boutaill Borhellig war-neuñv en e gichenn, ha gand eur youh kreñv "Mél!" e splujas Pou e-barz an dour, e tapas ar voutaill, hag en em zispahas evid dond en-dro d'e wezenn a-nevez.

"Siwaz!" a lavaras Pou, pa zigoras anezi. "Glebiet toud on bet evid netra. Petra eo an tamm paper-ze?"



Kemer a reas anezañ hag e sellas outañ.

"Eul lizer an hini eo," a lavaras dezañ e-unan, setu petra eo. Hag al lizerenn-mañ a zo eur "P", ha setu, ha setu, ha "P" a dalv kement ha "Pou," neuze ez eo eul Lizer pouezuz-tre evidon, ha ne hallan ket lenn anezañ. Red eo din kavoud Kristofer Robin, pe Kaouenn pe Porhellig, unan euz al Lennerien Ampart-se a hall lenn traou, hag e lavarint din petra a zo e-barz al Lizer-ze. N'hallan ket neuvi avad. Siwaz!"

Neuze e-noa eur menoz, hag e soñjan evid eun Arz bihan-tre e benn, e oa eur menoz mad. Lavared a reas dezañ e-unan:

"Ma hall eur voutaill mond war-neuñv, neuze eur pod a hall mond war-neuñv, ha ma ya eur pod war-neuñv, e

hallan azeza warnañ, mar deo eur pod braz-kenañ."



Neuze e kemeras e bod brasa, hag e stouvas anezañ.  
"Peb bag a dle kaoud eun ano," emezañ, "neuze e vo  
*An Arz war-neuñv* ano va hini." War-ze e laoskas e vag  
da goueza e-barz an dour, hag e lammas war he lerh.



E-pad eur pennadig amzer Pou hag *An Arz war-neuñv*  
a oe war-var o houzoud pehini anezo a dlee beza war-laez,  
med goude beza esaet eun doare pe zaou, e oe kempouezet  
an traou gand *An Arz war-neuñv* dindan ha Pou  
laouen-meurbed a-haoliad warnañ, o pagea kreñv gand e  
dread.



Edo Kristofer Robin o veva e penn uhella ar hoad. Glao  
a ree, hag e ree glao, hag e ree glao, med ne halle ket an  
dour dond beteg e di. Brao e oa selled ouz an traoniennou  
ha gweled an dour e peb leh en-dro dezañ, med e ree  
kemend a hlao ma chome er gêr an darn-vrasa euz an  
amzer, hag e soñje diwar-benn traou 'zo. Beb beure ez ee  
er-mêz gand e zizglavier hag e lakee eur vaz el leh ma teue  
an dour, ha beb beure war-lerh ez ee er-mêz ha ne oa ket  
ken evid gweled e vaz, neuze e lakee eur vaz all el leh ma  
teue an dour, ha neuze ez ee d'ar gêr a-nevez, ha beb beure  
e oa berroh an hent e-noa d'ober eged an hini e-noa bet  
d'ober ar beure a-raog. Diouz beure ar pemved devez e  
welas an dour penn-da-benn en-dro dezañ, hag e ouias  
evid ar wech kenta en e vuhez e oa war eun enezenn  
wirion. Ar pezh a lakee birvill ennañ.

Diouz ar beure-ze an hini eo e teuas Kaouenn war-nij  
a-uz d'an dour da lavared "Penaos ema kont?" d'he  
mignon Kristofer Robin. "Sell 'ta, Kaouenn," a lavaras  
Kristofer Robin, "daoust hag-eñ n'eo ket fentuz? Emaon  
war eun enezenn!"

"Doareou an êrgelh n'int ket bet euz ar gwella en

deiziou-mañ," a lavaras Kaouenn.

"Ar petra?"

"Glao 'n-eus greet," a zisklerias Kaouenn.

"Ya," a lavaras Kristofer Robin. "Greet e-neus."

"Live an dour a zo savet uheloh eged biskoaz."

"Ar petra?"

"Kalz a zour a zo tro-dro," a zisklerias Kaouenn.

"Ya," a lavaras Kristofer Robin. "Bez' ez eus."

"Koulskoude, ar gallustedou a deu da veza buan gweloh a-du. N'eus forz pegoulz .."

"Gwelet 'peus Pou?"

"M-eus ket. N'eus forz pegoulz ..."

"Spi am-eus e ya mad an traou gantañ, "a lavaras Kristofer Robin. "Chalet e oan gantañ. Sur a-walh ema Porhellig gantañ. Te gav dit e ya mad an traou ganto, Kaouenn?"

"Sur a-walh. Gweled a rez, n'eus forz pegoulz ..."

"Kee da weled, Kaouenn. Pa n'eus ket kalz a dra e-barz penn Pou, hag e hellfe ober eun dra droch bennag, hag e karan kemend anezañ, Kaouenn. Kompren a rez, Kaouenn?"

"Mad-tre," a lavaras Kaouenn. "Mond a rin. Hag e teuin en-dro dioustu." Hag e nijas kuit.

A-benn eur pennadig amzer e oa deuet en-dro.

"Pou n'ema ket eno," emezañ.

"N'ema ket eno?" "Bet eo bet eno. Azezet eo bet war eur skourr euz e wezenn er-mêz euz e di gand nao podad mél. Med n'ema ket eno bremañ."

"O, Pou!" a huchas Kristofer Robin. "Peleh emaout?"

"Emaon amañ," a lavaras eur vouez o hromellad a-dreñv dezañ.

"Pou!"

Redeg a rejont e diouvreh an eil egile.

"Penaos out deuet beteg amañ, Pou?" a houlennas Kristofer Robin, pa oe gouest da gomz adarre.

"War va bag," a lavaras Pou, lorch ennañ. "Degemeret em-eus eul Lizer Pouezuz-kenañ a oa bet kaset din en eur voutaill, ha pa 'm-oa tapet eur bannah dour e-barz va daoulagad, ne oan ket evid lenn anezañ, hag em-eus kaset

anezañ dit. War va bag."

Gand ar geriou lorchuz-se e roas al lizer da Gristofer Robin.



"Med, digand Porhellig an hini eo!" a huchas Kristofer Robin p'e-noa lennet anezañ.

"N'eus netra e-barz diwar-benn Pou?" a houlennas Arz, en eur zelled dreist e skoaz.

Kristofer Robin a lennas al lizer a vouez uhel.

"O! daoust hag-eñ eo ar "P"-ou perhelligou? Me gave din e oant pou-iou."

"Red eo dim saovetaad anezañ dioustu! Me gave din e oa ganit, Pou. Kaouenn, daoust hag-eñ e hellfes savetei anezañ war da gein?"

"Ne gav ket din," a lavaras Kaouenn, goude beza soñjet siriuz-tre. "Arvaruz eo hag-eñ e hellfe kigennou va hein ..."

"Neuze, daoust hag-eñ ne hellfes ket nijal davetañ dioustu evid lavared dezañ e vo saveteet dizale? Ha Pou ha me a zoñjo penaos e Zavetei hag e teuim ken buan ha ma hellim. O, na gomz ket, Kaouenn, kee buan!" Hag, en eur zoñjal bepred e-noa eun dra bennag da lavared, e nijas Kaouenn kuit.

"Neuze bremañ, Pou," a lavaras Kristofer Robin, "peleh ema da vag?"

"Red eo din lavared," a zisklerias Pou pa ziskennet beteg aod an enezenn, "n'eo ket eur vag ordinal. A-wechou ez eo eur Vag, hag a-wechou n'eo nemed eur Gwallzarvoud. Se zo hervez."

"Hervez petra?"

"Hervez ma'z on warni pe dindanni."

"O! Ma, peleh ema?"

"Aze!" a lavaras Pou, en eur ziskouez, lorch ennañ, *An Arz o neu*.

Ne oa ket ar seurt bag e oa Kristofer Robin o soñjal gweled, hag ar muia e selle outi, ar muia e soñje pebez Arz Kaloneg hag Ampart e oa Arz Pou, hag ar muia e lavare Kristofer Robin an dra-ze, ar muia, uvel, e selle Pou war-draoñ hag e klaske lavared ne oa ket.

"Med re vihan eo evidom-ni on-daou," a lavaras Kristofer Robin gand tristidigez.

Tri, gand Porhellig."

"Neuze ez eo bihannoh c'hoaz. O, Arz Pou, petra a raim?"

Ha neuze an Arz-se, Arz Pou, Winnie-ar-Pou, M.P. (Mignon Porhellig), K.K. (Kompagnon Konikl), D.P.A. A.H. (Dizoloer Penn-Ahel an Hanternoz), F.I.K.L. (Frealzer Iañ ha Kaver Lost) — e gwirionez Pou e-unan — a lavaras eun dra ken fur ma ne helle Kristofer Robin nemed selled outañ, e henou digor war nav eur ha sonn e zaou-lagad, en eur en em houlenñ hag-eñ e oa e gwirionez an Arz Bihan-tre e Benn e-noa anavezet ha karet abaoe ken pell.

"Bez' e hellfem mond e-barz da zizglavier," a lavaras Pou.

"?"

"Bez' e hellfem mond e-barz da zizglavier," a lavaras Pou.

"?"

"Bez' e hellfem mond e-barz da zizglavier," a lavaras Pou.

"!!!!!"

A-daol-trumm e komprenas Kristofer Robin e hellfent ober. Digeri a reas e zizglavier, hag e lakaas anezañ war e benn en dour. War-neuñv e chome hag eh horjelle. Mond a reas Pou e-barz. P'edo just o vond da lavared e oa mad an traou gantañ, e kavas ne oant ket, neuze goude beza



evet eur banne bihan n'e-noa ket bet c'hoant anezañ e gwirionez, e fourbouillas en-dro beteg Kristofer Robin. Neuze ez ejont e-barz o-daou asamblez, hag ne horjelle ket ken.


"Ober a rin *Penn Pou* euz ar vag-se," a lavaras Kristofer Robin, hag ez eas kuit *Penn Pou* war-zu ar Mervent, en eur drei en eun doare plijuz.

Sur e hallit ijina levezet Porhellig pa zeuas ar vag a-benn-ar-fin er gwél anezañ. Bloaveziou goude e plije dezañ soñjal e oa bet en eur Riskl Braz-Kenañ e-pad al Liñvadenn Derrubl, med ar riskl nemetañ e-noa bet e gwirionez a oe e-pad an diweza hanter-urvez ma oa prizoniet, pa azezas Kaouenn, hag he-doa just nijet beteg ennañ, war eur skourr euz e wezenn evid frealzi anezañ, hag e kontas dezañ eun istor hir-hir diwar-benn eur voereb dezañ he-doa dozvet eur vi-skreo dre fazi, hag e talhe hag e talhe an istor da vond en-dro, eun tamm bihan evel ar frazenn-mañ, beteg ma krogas Porhellig, a oa o selaou ouz e brenest heb kalz spi, da gousked sioul hag ez-naturel, o rikla goustadig er-mêz euz ar prenest war-zu an dour beteg ma oe a-istribill gand e vizied-treid nemetken, ha just d'ar poent-se, evuruzamant, eur youh raouliet gand Kaouenn, a oa e gwirionez eun darn euz an istor, o veza ma oa ar pez a lavaras e voereb, a zihunas Porhellig hag a roas dezañ just amzer da lammad a-stroñs war-dreñv evid beza e surentez ha lavared, "Pegen interesuz eo, greet he-doa evel-se?" pa welas — ma, bez' e hellit ijina e levezet pa welas a-benn



ar fin ar vag vrag, *Penn Pou* (Kabiten, K. Robin; *Mestrkenta*, Arz P.) o tond war ar mor da zavetei anezañ...

Ha pa'z eo e gwirionez diwez an istor, ha pa'z on skuiz-kenañ goude ar frazenn ziweza-mañ, e soñjan e vefe gwelloc'h din echui amañ.



## Pennad dég

### Ennañ e ro Kristofer Robin eun abadenn en enor Pou, hag e lavarom kenavo.

Diouz eun devez pa oa deuet en-dro an heol a-uz d'ar Hoad, o kas gantañ c'hwez-vad miz mae, hag e oa oll oueriu ar Hoad o tintal laouen oh en em gavoud a-nevez en o stumm koant, hag ar poullou-dour bihan a chome da huñvreal diwar-benn ar vuhez o-doa gwelet hag an traou braz o-doa greet, hag e oa ar goukoug e tommder ha sioulder ar Hoad oh êseed aketuz e vouez hag o selaou anezi evid gweled hag-eñ e kare anezi, hag e oa ar hudoned o klemm gand eur vouez dous an eil d'egile en o doare lezireg hag hegarad e oa dre fazi an hini all, med ne oa ket grevuz; diouz eur seurt devez ma c'hwitelle Kristofer Robin en e zoare ispisial, hag e teuas Kaouenn er-mêz euz Koad ar Hant Devez-arad evid gweled deuz petra a oa ezomm.

"Kaouenn," a lavaras Kristofer Robin, "emaon o vond d'ober eur fest."

"Gwir eo?", a lavaras Kaouenn.

"Hag e vo eur seurt fest ispisial, peogwir ez eo peogwir ez eo ar pez e-noa greet Pou p'e-noa greet ar pez e-noa greet p'e-noa saveteet Porhellig euz an dour-beuz."

"O!, evid an dra-ze an hini eo, neketa?" a lavaras Kaouenn.

"Ya, neuze lavar da Bou ar buanna posubl, ha d'an oll re all, peogwir e vo a-benn arhoaz."

"O! gwir eo, gwir eo?" a lavaras Kaouenn, o klask rei



sikour kement ha ma halle.

"Neuze, ez i da lavared dezo, Kaouenn?"

Klask a reas Kaouenn kavoud eun dra bennag fur-tre da lavared, med ne deuas ket a-benn, neuze e nijas evid lavared d'ar re all. Hag an hini kenta a lavaras dezañ a oe Pou.

"Pou," emezañ, "Kristofer Robin a zo o vond da renka eur fest."

"O!" a lavaras Pou. Ha neuze o weled e oa Kaouenn o hortoz ma lavarfe eun dra bennag all, e lavaras, "Daoust hag-eñ e vo ar seurt gwestell bihan-ze gand sukr ruz-roz skeduz warno?"

Soñjal a reas Kaouenn ne oa ket deuz e renk komz diwar-benn seurt gwestell bihan gand sukr ruz-roz skeduz warno, neuze e lavaras da Bou just ar pezh e-noa lavaret Kristofer Robin, hag e nijas da gavoud Iañ.



"Eur fest Evidon?" a zoñjas Pou ennañ e-unan. "Pegen kaer!" Hag e komañsas d'en em houlenn hag-eñ e ouezfe an oll loened all e oa eur Fest ispisial evid Pou, ha daoust hag-eñ e-noa komzet outo Kristofer Robin diwar-benn *An Arz War-neuñv* hag ar *Penn Pou* hag an oll bigi burzuduz e-noa ijinet ha merdeet warno, hag e komañsas da zoñjal pegen spontuz e vefe bet dizoñjet an dra-ze gand an oll re, ha ne ouezfe ket pep hini perag e oa savet ar fest; hag ar muia e soñje evel-se, ar muia e oa rouestlet ar fest en e spered, evel eun huñvre pa ne da ket pep tra war-eeun. Kregi a reas an huñvre da gana drezi heh-unan en e benn beteg ma teuas da veza eun doare kanaouenn. Evel-se e oa:

## GWERZ POAN-SPERED POU

Hourra evid Pou!  
(*Evid Piou?*)  
Evid Pou...  
(*Perag e-noa greet?*)  
Me zoñje din e ouieh;  
Savetei e vignon euz an dour-beuz e-neus greet!  
Hourra evid Arz!  
(*Evitañ?*)  
Evid Arz...  
Ne helle ket neuï,  
Med e-neus saveteet anezañ!  
(*Piou e-neus saveteet?*)  
O, selaouit, grit!  
Emaon o komz diwar-benn Pou...  
(*Diwar-benn piou?*)  
Diwar-benn Pou!  
(*Va digarezit, dizonjet am-oa*).  
Ma, Pou a oa anezañ eun Arz gand eur Penn Braz-  
spontuz—  
(*Lavarit an dra-ze adarre!*)  
Gand eur Penn Braz-spontuz...  
(*Petra oa braz-spontuz?*)  
Ma, debret e-neus kalz,  
Ha ne ouzon ket hag-eñ e helle neuï pe ne ree ket,  
Med e teuas a-benn da chom war-neuñv  
War eun doare bag  
(*War eun doare petra?*)  
Ma, eun doare pod...  
Neuze bremañ huchit teir gwech hourra dezañ a-greiz-  
kalon  
(*Neuze bremañ huchom dezañ teir gwech hourra a-  
greiz-kalon!*)  
Hag esperom e vo ganeom-ni e-pad bloaveziou ha  
bloaveziou,  
Hag e kresko e yehed hag e furnez hag e vadou!

Hourra evid Pou!  
(*Evid piou?*)  
Evid Pou...  
Hourra evid Arz!  
(*Evitañ?*)  
Evid Arz...  
Hourra evid Winnie-ar-Pou heb e bar!  
(*Med lavarit din ... Petra e-neus greet?*)

E-pad ma oa o kana an dra-ze en e spered, e oa  
Kaouenn o komz ouz Iañ.

"Iañ," a lavaras Kaouenn, "Ema Kristofer Robin o  
vond da renka eur fest."



"Interesuz-kenañ," eme Iañ. "Me zoñj din e kasint din  
ar restachou bet flastret ganto. Jentil hag Hegarad. Truga-  
rez: re zo."


"Eur gouviadenn a zo evidout."

"Petra eo an dra-ze?"

"Eur gouviadenn!"

"Ya, klevet am-eus ahanout. Piou e-neus laosket anezi  
da goueza?"

"N'eo ket eun dra da veza debret, evid goulenn diganit  
dond d'ar fest an hini eo. Warhoaz."



Lavared a reas "nann" goustadig gand e benn.

"Te a fell dit komz diwar-benn Porhellig. An hini bihan gand dioueskouarn iskiz. Porhellig an hini eo. Me a lavaro dezañ."

"N'eo ket n'eo ket!" a lavaras Kaouenn, diêzet. "Te an hini eo!"

"Sur out?"

"Evel just on sur. Kristofer Robin e-neus lavaret : "An oll anezo! Lavar d'an oll anezo!"



"An oll anezo, nemed Iañ."

"An oll anezo," a lavaras Kaouenn, war eun ton mouzet.

"A!" eme Iañ. "Eur fazi, moarvad, med memestra ez in. Med na damall ket ahanon ma ra glao."

Med ne reas ket glao. Greet e-noa Kristofer Robin eun daol hir gand koadennou hir, hag eh azezint oll an-dro dezi. Azeza a reas Kristofer Robin en eur penn, ha Pou en hini all, hag etrezo deuz eun tu e oa Kaouenn hag Iañ ha Porhellig, hag etrezo deuz an tu all e oa Konikl, ha Rou ha Kanga. Hag oll vignoned ha kerent Konikl amañ hag a-hont war ar geot, hag o hortoz gand spi e komze unan bennag outo, pe a laoskfe tra-pe-dra da goueza, pe a houlennfe diganto péd eur eo.

Ar wech kenta e oa da Rou mond d'eur fest, hag e oa birvill ennañ ken-ha-ken. A-benn ma oant azezet e komañsas da gomz.

"Salud, Pou!" a wihis.

"Salud, Rou!" a lavaras Pou.

Lammad-dilammad a reas Rou war e gador e-pad eur pennadig amzer ha neuze e krogas adarre.

"Salud, Porhellig!" a wihis.

Porhellig a reas sin dezañ gand e bao, o veza re zalhet evid lavared tra.

"Salud, Iañ!" eme Rou.

Tristidig e stouas Iañ e benn davetañ. "Glao a raio bremaig, gortoz nemetken eur pennadig amzer," emezañ.

Neuze e hortozas Rou eur pennadig amzer, ha ne ree ket glao, neuze e lavaras : "Salud, Kaouenn!" ... hag e lavaras Kaouen: "Salud, va mignon bihan," en eun doare hegarad, hag e talhas da gomz ouz Kristofer Robin diwar-benn eur gwallzarvoud a oa erruet kazimant d'eur mignon dezañ n'anaveze ket Kristofer Robin, ha Kanga a lavaras da Rou, "Ev da vanne lêz da genta, loulig, ha komz goude." Neuze Rou, a oa oh eva e vanne lêz, a êseas lavared e hell ober an daou dra asamblez... hag e oe red skoiata anezañ war e gein ha seha anezañ e-pad pell goudeze.



Pa o-doa debret kazimant toud a-walh, e skoas kreñv Kristofer Robin war an daol gand e loa, hag e paouezas pep hini da gomz hag e oent toud didrouz-tre, nemed Rou a oa just o paouez echui gand eur barrad hik a oa bet gantañ hag o klask rei da gredi e oa unan euz kerent Konikl.

"Ar fest-mañ," a lavaras Kristofer Robin, " a zo eur fest evid ar pezh a reas unan bennag, hag e ouezom oll piou e oa, hag ez eo e fest, evid ar pezh a reas, hag eur prof a zo ganin evitañ ha setu-eñ." Neuze en em zornatas eun tammig hag e vouskomzas, "Peleh ema?"

Tra ma oa o klask, e pasaas Iañ en eun doare spontuz

hag e komañsas da gomz.

"Mignoned," emezañ, "gand ar restachou da heul, ez eo bet eur blijadur vraz, pe marteze e vefe gwelloc'h din lavared ez eo bet eur blijadur vraz beteg bremañ, da weled ahanoh em fest. Ar pezh a ris ne oa netra. N'eus forz pehini ahanoh – nemed Konikl ha Kaouenn ha Kanga – e-nije greet memez mod. O, ha Pou. Va evezadennou, evel just, n'int ket evid Porhellig ha Rou, peogwir ez int re vihan. N'eus forz pehini ahanoh e-nije greet memez mod. Med dre zegouez e oant bet greet Ganin-me, setu toud. Ne oa ket, a-boan ma tlean lavared, gand ar menoz da gaoud ar pezh ema Kristofer Robin o klask bremañ", hag e lakaas e harr a-raog war e henou hag e lavaras gand eur mouskomz kreñv, "Esae dindan an daol", "ar pezh a ris a ris – med peogwir e soñjan e tleom oll ober ar pezh a hellom evid rei sikour. Me zoñj din e tlefem toud ..."

"H-ep!" a lavaras Rou dre zegouez.

"Rou, loulig!" a lavaras Kanga, war eun ton leun a rebechou.

"Me an hini e oa?" a houlennas Rou, souezet eun tammig.

"Diwar betra ema Iañ o komz?" a vouskomzas Porhellig ouz Pou.

"N'ouzon ket," a lavaras Pou, tristidig.

"Me zoñje din e oa an dra-ze da fest."

"Da genta e soñjis e oa. Med n'eo ket, moarvad."

"Me garfe gwelloc'h e vefe da hini eged hini Iañ," a lavaras Porhellig.

"Me ive," a lavaras Pou.

"H-ep!" eme Rou adarre.

"EVEL – MA – OAN – O LAVARED," eme Iañ kreñv ha rust, "evel ma oan o lavared pa oe trohet va homz ouzin gand Trouziou Kreñv a bep seurt, e soñjan ma..."

"Setu-eñ!" a huchas Kristofer Robin, birvill ennañ.

"Roit anezañ d'ar paour-kêz Pou koz. Evid Pou an hini eo."

"Evid Pou," a lavaras Iañ.

"Evel just ez eo. Ar gwella arz er béd a-béz."





"Me am-ije dleet gouzoud, "eme Iaň. "A-benn ar fin, ne heller ket klemm. Va mignoned am-eus. Unan a gomzas din deh just. Ha daoust hag-eñ e oa ar zizun ziweza pe ar zizun a-raog ma tosas Konikl warnon hag e lavaras "Siwaz!" Kelh ar Gevredigez. Bepred ez erru eun dra ben-nag."

Dén ne oa o selaou, rakara e oant oll o lavared, "Digor anezaň, Pou," "Petra eo, Pou?" "Me oar petra eo," Ne rez ket, ne rez ket," hag eveziadennoù all seurt-se evid sikour anezaň. Hag evel just e oe digoret gand Pou ken buan ha ma helle, med heb troha ar fiseleñ, peogwir ne ouezer morse pegoulz eun tamm fiseleñ a hellfe beza talvouduz. A-benn ar fin e oe digoret.

Pa welas petra e oa, e oe tost da goueza, ken plijet e oa. Bez' e oa eur Voestad Kreionou Ispisial. Bez' e oa e-barz kreionou merket "A" warno evid "Arz", ha kreionou merket warno "AS" evid Arz Sikouruz, ha kreionou merket warno "AK" evid Arz Kaloneg. Bez' e oa eur gontell evid lemma ar hreionou, hag eur gom evid diverka an oll faziou doare-skriva, hag eur reolenn evid tresa linennou evid ma kerzfe ar geriou warno, ha santimetrou merket war ar reolenn kenkaz ho-pefe c'hoant da ouzoud péd santimetr a vuzulie n'eus forz petra, ha Kreionou Glaz ha Kreionou Ruz ha Kreionou Gwér evid lavared traou ispisial e glaz hag e ruz hag e gwér. Hag an oll traou dudiuz-se a oa e beb a zah bihan en eur Voest Ispisial a veze prenet gand eur hliked pa veze kliketet warni. Hag e

oant toud evid Pou.

"O!" a lavaras Pou.

"O, Pou!" a lavaras an oll re nemed Iaň.

"Trugarez," a lavaras Pou gand eur vouez raouliet.

Med en em lavare Iaň, "Toud an traou-ze evid skriva. Kreionou ha n'on petra. Traou prizachet kalz re, d'am zoñj. Traou sod. Didalvoud a-grenn."

Diwezatoñ, p'o-doa lavaret toud "Kenavo" ha "Trugarez" da Gristofer Robin, Pou ha Porhellig a yeas a-gevred d'ar gêr en eur brederia en abardaez alaouret, hag e-pad pell amzer e oent didrouz.

"Pa zihunez diouz ar beure, Pou," a lavaras Porhellig "benn ar fin, "pehini eo an dra genta a lavarez dit-te da-unan?"

"Petra zo da zijuni?" a lavaras Pou. "Petra a lavarez dit-te da-unan, Porhellig?"


"Lavared a ran, en em houlenñ a ran peseurt tra vourruz a erruo hirio?" a lavaras Porhellig.

Heja a reas Pou e benn en eur brederia.

"Ar memez tra an hini eo," emezaň.

\*\*\*

"Ha petra a erruas?" a houlenñas Kristofer Robin.



"Pegoulz?"

"Diouz ar beure war-lerh."

"N'ouzon ket."

"Daoust hag-eñ e hellfez en em zoñjal, ha konta anezaň

din ha da Bou eur wech bennag?"

"M'ho-peus c'hoant braz."

"Pou e-neus c'hoant," a lavaras Kristofer Robin.

Huanadi a reas kreñv, dastum a reas e arz dre e harr hag e valeas beteg an nor, en eur stoleja Winnie-ar-Pou a-dreñv dezañ. Ouz an nor en em droas hag e lavaras, "Daoust hag-eñ e teuoh da weled ahanon o kibella?"

"Marteze," emezon.

"Daoust hag-eñ e oa boestad kreionou Pou gwelloc'h eget va hini?"

"Ar memez hini rik e oa," emezon.

Heja a reas e benn hag ez eas kuit... hag eun tammig goude e klevis Winnie-ar-Pou – *boum, boum, boum* – o pignad gand ar skalierou a-dreñv dezañ.

